

Berthou Erwan

(Alc'houeder Treger) Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

Dre an delenn hag ar horn-boud, bet embannet e 1904.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez gand ereadurez ar galleg.

Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Gwechou 'zo e ra gand *muioh* ha *muiañ* evid an dereziou uheloh hag uhella.

Iskiz e vo soñjet marteze beza adembannet ar skrid-se, gand ar seurt mennoziou a zo ennañ. Eun doare istorel an hini eo. Gouennelour e oa Berthou. Med e save a-eneb gouennelourien all, ar re o-doa bet merket e-barz reolennoù ar skoliou derez izel : “Greet e vo er skoliou gand ar galleg nemetken“. Diêz e oa beza gouennelourroh ! Hag ar vistri-skol, re ar skoliou kristen kenkoulz ha re skoliou ar Republik, d'ober memez mod : kastiza ar vugale a ree gand o yez orin, amañ, e Breiz-Izel, gand ar brezoneg.

Ma n'ema ket ken ar brezoneg yez ar gevredigez ez eo pa veze red gouzoud ar galleg evid kaoud labour. Se a oa pa veze tud a ree gand ar galleg, tud na reent nemed gand ar galleg, e penn an arboellerez. Ha bremañ, ma talh an traou da vond evel bremañ, a-benn kant vloaz e vo ar galleg dirag ar saozneg evel m'ema bremañ ar brezoneg dirag ar galleg.

Taolenn

Ar gwir 'eneb ar bed

Mennad

Distro ar barz

Klemmvan war ar vartoloded

Klemmvan maro Keillenn ar Braz

Marharidig a Geronar

Maro Javre Pontgwenn, marheg.

Evel e karer en Breiz

Kanaouenn eured mab-an-Argoad

Klemm ar barz disanvezet

Frealziez d'ar barz koz

An amzer koz keltieg

Hadtro Brizeug

An awen Geltieg

An dihun keltieg

An hini diwriziennet

Dihun Breiz

Galv d'ar Vretoned

An dever

War-zav !

Diougan Gwiklan

Diougan maro Par-Iz

An hini goz

Dousig koant ar barz

Kan broaduz

Eil maro Renan

Vañjañs an Ankou

Chomom en Breiz

Ti kaniri Vreiz

Broad sklaved !

Luskellerez

Evid skeudenn Nominoe

Goude komz

Ar gwir 'eneb ar bed

Al levrig-mañ 'zo kinniget

Da Yann ar Fuster

(Yann ar Gwillerm)

Drouiz-Meur Gorsedd Barzed

Gourenez Breiz-Izel.

Mennad

*O te, ma henvreur a vevas
'Tre ar Porz-Gwenn ha Roh-Allaz,
Demdost leh eh on ma-unan
Ganet d'ar vuhez, o ! Gwiklan !*

*Diouganer, Barz ha Merzer,
Ro din-me nerz en peb amzer
'Vid sevel ma mouez evel dout,
N'eus forz penaoz 'vo ma darvoud.*

*Goude toullet ma daoulagad,
Na pa ve distanket ma gwad
Gand gwasker milliget ma bro,
Gra din-me c'hoaz youhal, garo,
Em diweza kanadenn :
Reuz d'an Estren ! Breiz da viken.*

Notenn gand Embann an Hirwaz : gouennelour e oa Berthou.

Distro ar barz

I

Ganet en douar lann ha roz,
War ribl mor gouez an hanternoz,
Pa oan e-barz ma henta noad¹,
'N em gwazied 'oa ruz ar gwad.

Bervi 'ree dindan êr an aot,
Mez bremañ glaz eo ma dioujod ;
Siwaz ! mond a ran 'dreuz broiou,
Eun huelenn-hwerv 'n em genou.

Ma zadou koz, beo pe varo,
'Oa enoret meurbed 'n o bro...
Allaz ! ha me, war zistro 'n oad,
'Zo evel eur yeotenn er prad.

'Uz d'o fenn an heol a bare,
Sellou at bobl 'zave oute.
Piou 'ta 'oar 'on-me mad pe fall ?
Ken izel on 'vel ar re all.

An dud koz a ouie bevañ
Fur ha digemmesk er bed-mañ ;
O liorzig e labourent
Ha 'mesk o bleun e save sent.

Al liorzou 'zo dilezet,
Ar bleun gand an drez 'zo mouget ;
Er maner hep toenn na dor,
'Mañ o yudal avel ar mor.

Ar sklêrijenn a ya da guz
An Noz-Veur 'zo o tond euzuz,
Ruz-gwad he dremm, an heol a ouel,
'Raog mervel, war ribl an dremmwel.

Ha te, ma houlm ! pebez buhe',
'M-eus-me greet dit beteg herie,
Ha te bet joa hepken ma zi,
Stok da galon ouz ma hini !

Sklaset ha gwasket ma halon,
'Barz ar hañvou, 'barz ar spouron,
Mond a ran war an dismantrou
Eun huelenn-hwerv em genou !

II

Hogen setu eun heol nevez,
Ledan, bannet, tarzet er gwez ;
Eur vro gaer 'zo 'n em astennet,
War ribl ar mor, en penn ar bed.

¹ noad : tregrieg : oad.

Kalon an douar a glever
O vervi en-kreiz he donder ;
Ar houmoul du 'red en neñvou ;
Er parkeier 'tiwan bleuniou.

Harluet an deñvalijenn,
Ar joa 'zo en lagad an den ;
Ar vreudeur 'deu d'en em anavoud,
Ha, dorn-ouz-dorn, 'halv an darvoud².

A-dreñv, dismantrou milliget !
E leh 'oa ma halon mantret,
E leh e skuillen d'an douar
Ma gwad ha daerou ma glahar.

Salud dit ! douar dudiuz !
Ouz da zelloud 'teuan nerzuz :
Peb yez, peb lid, pep koun, peb giz
'H-eus dasorhet d'o yaouankiz.

Hijet ar poultr euz seul ma zreid,
Gand eur galon zeder 'h an dit³.
Setu-me arru da ganañ
E-touez da vugale 'r wellañ.

Taolet am-eus ar vleuenn hwerv
Ha kutuillet war ribl an erv,
E-touez bleuniou 'n douar-labour,
Eun dro-heolig erh hag aour.

Ha bremañ, mar 'm-bez gras Doue,
Me 'ya, 'n pad dilerh ma buhe',
Da blañsoni kurunenno'
En brankou lore ha dero.

II

Klemmvan war ar vartoloded

C'hoarvezet eo ar miziu du :
Gante 'r gwall-amzer 'zo arru,
An amzer garo, didruez,
'Vid ar re 'zo er-mêz bemdez.

En fulor an deiz hag an noz,
Heb eun dale, war ma zi kloz,
An ti koz a glemm hag a gren,
E klevan 'n avel o tremen.

A-wechou eh arru sioul
Hag e c'hwistell sard ouz pep toull,
Mez e nerz e tastum raktal
Da lampad 'vel eun aneval.

² an darvoud : an amzer da zond.

³ dit : ne rim ket.

Ar gwez braz ar muiañ nerzuz
'Zo gweet gand al loen spontuz ;
Hag an tier, war ar hrehiou,
Eo diframmet o zoennou.

Nijal 'ra 'n deliou hag ar plouz
A-dreuz d'an oabl gleb, leun a drouz,
A drouz hag a deñvalijenn
En droidell ar gorventenn.

O ! gwaso amzer 'zo arru !
Glaog hag avel, hag a bep tu,
Bemdez, en draonienn ha war greh
Hag herie gwasoh evid deh.

*

'Eneb d'an amzer en kounnar,
Ar paour-kêz labourer-douar,
'Daleg ar beure 'zo bepred
O ploma ar parkou d'an ed.

Mez re all, 'dleer klemm ivez,
En riskl a honez o buhez,
En eur vagig brañskidillet⁴
War ar mor don dishualet.

Ar re-ze 'zo dalhamad dirag
Ar maro euzuz en o bag :
Ar vag a stroñs hag a wigour
War lein hag en kleuz an erv dour.

Ne oar den petore buhe'
O-deus an dud a vor du-ze,
Er pellder, en-kreiz ar stourmou,
Labourerien ar gwagennou.

O ! c'hwi 'n ho kwele tomm, en noz,
Goud ouzoh pegoulz ha penaoz
Ha peleh er mor e varvo
Martoloded kêz euz or bro ?

An avel griz a yud er gwe',
Mez c'hwi a gousk en ho kwele ;
Klozet mad eo prenest ha dor ;
Ne glevit ket fulor ar mor.

Teir gwech am-eus greet tro ar bed,
-Rag war ar mor, pell eh on bet –
Ha teir gwech gwelet ar maro,
Etre an dour hag an neñvo'.

Dre ze, pa deu ar gwall-amzer,
Ma spered a vale brazder,
Brazder ar moriou kounnaret

⁴ brañskidillet : branskellet.

War-lerh an oll vartoloded.

C'hoaz mar deufe ar horv maro
D'e vammig-vro war al lano,
Neuze, war an douar santel,
'Pedfe ar wreg hag ar bugel !

An deiz all, dirag toull ma forz,
Eur wreg yaouank a grie forz
O vond da gerhad he fried
En porz-mor Sant-Malo beuzet.

Mez pegement ne deufont ket
D'o farrouz koz da beurgousked !
Taolet du-hont, taolet du-ze,
Ne deuio ket dioute doare.

Pa yelo 'n avel en ho tor,
Pedit evid an dud a vor
An Itron Varia 'Wir Zikour
D'o zavetei euz an dour.

III

Klemmvan maro Kelien ar barz

Sonit, kleier ar Roh ha kleier Landreger,
Sonit ar hlaz ;
Eur barz a zo maro, du-hont, 'raog e amzer,
'N kreiz ar Gêr-Vraz.

Sonit, kleier Plouyel ha kleier Sant-Erwan,
'Uz d'an diou ster ;
Gand moueziou glaharuz, kleier, klemmit on foan,
War vêt, en kêr.

Merhedigou yaouank, displegit ho koefou,
Ha c'hwi, gwrazez,
'N em vantellit en du, rag herie 'zo kañvou,
En gwirionez.

O ! nag a garantez e-nevoa, 'n e galon,
Evidoh-hu !
Hag evdi bro ar brug, an dero, ar gomon⁵
Hag an itu⁶ !

Kerzit 'ta goustadig ha sioul, me ho ped,
'Hed an heñchou :
Biken, ma hoarezed, da Gelien ne zougfet
Re a gañvou.

*

⁵ ar gomon : ar bezin

⁶ itu : ed-du.

Eur goulm hlaz hag eur goulmig wenn,
En-dro da goz tour Sant Mikêl,
A nij o-diou a-denn-askell,
Hag a nijo da virviken.

Ahane 'weler ar mor glaz
Oh eoni war ar herreg,
Ar parkeier, gwer ha gwezeg,
Bete kein Bre, ar menez kraz.

Ahane e weler Briad,
Yeltrañs, Mode, Gwennou hga Erh ;
Oll Bro-Dreger, seder ha gwerh,
Dirag sellou an Ermêziad.

Or Bro a zispak he douster,
Etre ar mor hag ar mene' ;
An êr 'zo leun deuz heh ene,
Treh d'ar Gozni ha d'an Amzer.

War vor, war zouar hag en êr,
Dre-oll emañ roudou ar Zent.
'Vel an dour-red, war ribl an hent,
An daoulagadou a zo sklêr.

A beleh, goude ar maro,
Ene ar Barz a chomfe pell
Deuz e vro gaer a Vreiz-Izel,
Achu ar vuhez a zaerou' ?

Ar goulm hlaz hag ar goulmig wenn,
Neiziet en tour ar goz iliz,
'Zo daou ene deut war o hiz :
Eneou Renan ha Kelien.

En-dro deze 'krag ar brini,
Mez int, en tu all d'ar maro,
A nij, en sklêrder an neñvo',
En o huñvre, 'uz d'an dourni.

En-kichenn kêrig Landreger,
Pa vin, me ma-unan, maro,
Me 'yelo davete d'am zro,
Dindan skeudenn eun Alhweder.

Marharidig a Geronar

Troet deuz galleg Jarlez ar Goik.

Eur zon a zo laket en skrid,
Eur zon 'barz ar yez leonard⁷,
Eur zon diwar-benn Marharid
A Geronard.

Pinvig 'touez ar pennherezed,
Anvezet 'vid ar pinvika,
Kaset eo bet deh d'ar vered,
Da ugent vloa'.

« Gaodig ! Gaodig ! re grozin dah⁸...
Peleh 'mañ ho muzell ken flour,
Ha kouzoug gwenn, ho liou ken yah
Hag ho pleo aour ? »

« Mar karjeh, mamm, 'oan bet euruz :
Laret 'oa dah ; greet 'h-eus ho kiz :
Ne zo mann⁹, siwaz ! tremenuz
'Vel ar goantiz.

Petra 'nevo din talvezet
Beza koant 'vel ar frouez daro¹⁰,
Mar oan dre hoh urz ankouezet
Er gêr bep tro !

Braoa gwiadenn 'ra pillou
Ha koanta plah a ya da goz :
Dimezit ho merhed, mammou,
Heb re hortoz.

D'ar zul 'vin kaset d'an douar...
War va bez eh hadfet dioustu
Spern gwenn, bleuniou ar gwir glahar,
Ha rozig-ku¹¹.

O ! c'hwi ar re¹² 'zo pellaet,
Gand ho kalonou diwirion,
'Vel e pella 'r gwennilied,
D'ar yenion¹³.

Peogwir en or mêziou, herie,
Dijentil, tieg ha mevel
Hoh-eus oll bremañ ho kwrage'
Ouz ho kazell,

O ! tud yaouank deuz ma farrouz,

⁷ leonard : galleg. leoneg.

⁸ dah : tregerieg : deoh.

⁹ Ne zo mann : tregerieg : n'ez eus mann.

¹⁰ daro : darev ; azo.

¹¹ rozigku : rozinil.

¹² ar re : pere, er skrid orin.

¹³ yenion : yenienn.

Me bedo an aotrou Jezuz
Da rei dah eur vuhez didrouz
Hag eüruz.

Ha bremañ sonet an taoliou
Ha kerhet ar hantellou koar,
Ne zo mann¹⁴ ken ‘vid ma zellou
En Keromar.

War ar homzou-ze e varvas...
D’abardaez-noz, pa gouez ar gliz,
Ha kana ‘ree an deliou glaz...
De profundis !

¹⁴ Ne zo mann : tregerieg : n’eus mann

Maro Javre Pontgwenn, marheg

Bro an dud kaloneg, ha gwechall ha bremañ,
Breiz ! Piou ‘zo bet muioh kaloneg ‘vid hemañ ?

Ar Zaozon vreïn¹⁵, evel bleizi, da hanternoz,
Dre eun drubardiez, a zeuas er gêr goz.

Hogen Javre Pontgwenn ‘oa dihun ‘n e wele,
Trouz a glevas. Lampad a reas war e gleze.

Trouz binviou brezel ! « Saozon en Lannuon !... »
- N’eus ket ezomm harnez d’ar marheg a galon –

Gouriz-ler e gleze, skoulmet war e gorv noaz,
Hag e hoaf en e zorn, setu-hañ en hent braz.

‘N e-unan ‘eneb kant, ‘n e-unan ‘eneb mil,
E hoaf hag e gleze a-dehou, a-gleiz, a bil.

‘Vel eur bagad deñved, redet gand ar mesaer,
Ar Zaozon, diwadet, ‘zo bountet en kreiz-kêr.

Ar vez, en o halon, en diwez, a zavas :
« Mil den om o souza dirag eun den en noaz !

Archerien ! prim an taol, ‘raog n’arruo skoazell !
Pa n’om kadarn a-dost, bezom kadarn a-bell ! »

Eur zêz, hi reud ha lemm, penn e hlin a dreuzas :
Marheg Javre Pontgwenn, dre ar boan ‘vranskellas..

Ar zêz ‘n e harr, ha c’hoaz, e gleze ‘lugerni,
Souza ‘reas, goustadig, beetg moger e di.

Hag ouz ar voger c’hoz harpet e roe beh,
Ken na zeuas an nerz da zilezel e vreh.

Mez ar Zaozon bremañ, kalz nebeutoh nehet,
A dostae, rummuz¹⁶, o bouhaliou savet.

*

Siwaz ! ne fiñvez ken, marheg Javre Pontgwenn,
Gand eur Zaoz digalon eo trohet dit da benn.

Mez en douarou Breiz ‘zo c’hoaz had evel dout :
Sevel ‘ray meur a waz – Doue, ro deze gallou ! –

Hag ar gwad a rede ‘vel an dour a dremen :
Peurbaduz eo or houn ! Peuh dit ; Marheg Pontgwenn !

¹⁵ Ar Zaozon vreïn : brezel a oa dibaouez etre ar Zaozon hag ar Hallaoued.

¹⁶ rummuz : dre rummou, niveruz.

Evel e karer en Breiz

« Peleh ‘mañ ho tioujodig flour ?...
 Annaig kêz, glaharet oh,
 Ho talig gwenn ‘zo c’hoaz gwennoh ;
 Ho taoulagad ‘zo leun a dour. »

« Siwaz ! Yannig kêz, ma ene
 ‘Zo ‘n anken beteg ar maro.
 Ha mar gouvefes ar helo’
 Ken braz ‘ve da hlahar ive’. »

« O ! lavar din, ma dousig koant,
 ‘Vid petra da dristidigez ? »
 « Sonjal ennon mui na dleez :
 Biken Annaig ne vo drant. »

Hag ar plahig a lavare :
 « Ma zammig buhez ‘zo mantret :
 Ma lezvamm he-deus ma gwerzet,
 D’eun Ermêziad, deh ar beure.

Gwerzet d’eun den leun a fouge,
 Arruet moarvad a Vro-Hall ;
 Dre oll eh a, uhel e dal,
 Dirag an dud, dirag Doue.

Abaoe, me ‘red dre ar parkou,
 Gand an derzienn, gand an alter,
 ‘Vid klask ahanout, ma mignon ker,
 A-raog moned gand an Ankou. »

« Anna, dit, ma feiz ‘m-eus roet ;
 Ro din lodenn ivez ‘n ez poan...
 Mez argasom glahar ha doan :
 Ni ‘ya da veza eureujet.

Seh da zaoulagad leun a dour :
 ‘N eur Vro gaer heb fallagriez,
 Ni welo Jezuz, ar Werhez,
 An Itron Varia “Wir Zikour“. »

O glahar, siwaz ! ‘oa ken braz,
 Ken braz ‘vid o halonigou,
 Ken int marvet ‘n mesk ar bleuniou,
 Ar bleuniou aour euz troad ar Groaz.

Kanaouenn eured mab-an-Argoad

Setu amañ kaerra eured,
En Breiz-Izel ‘zo bet gwelet,
Moarvad abaoe c’hwezeg kantved.

Abaoe eo bet treuzet ar mor,
Gand on zadou, en Arvor
Ne zo bet greet¹⁷ kement ‘enor.

Da gement a dud deredet
Deuz Treger, Leon ha Gwened
Ha deuz Kerne, ar vro goadet.

Gweled a reer, pebez burzud !
Gweled ‘reer daouzeg-kant a dud ;
En o zouez meur a zen a vrud.

‘Mesk an dud wir, labourerien,
- Brankou glaz euz or hoz gwizienn –
- ‘N em vesk an Dougerien Delenn.

« Eur barz mad a vo dimezet... »
Ha raktal, setu ar Varzed
War dosennoù Skrignag savet.

Parrez Skrignag, war da vene’,
Parrez benniget gand Doue,
Brudet ‘vo ‘n eured a herie.

Ugent kaoter e-mêz an ti
E-barz an êr o vogedi
‘Vel pa vefe deg ‘timezi !

Mar ‘mañ bremañ on zadou
Astennet ‘barz ar berejou,
N’eo ket maro o hoz gizioù.

Dleoud a ra o ene skañv,
E-barz an êr ken glan bremañ,
‘Uz d’ on fenn tarnijal amañ.

Skiltruz, ar hleier, er beure,
‘Deus karillonnet evite,
Hag arruet int hebdale ?

Son ‘ra bombard ha biniou,
Leun eo ar park gand an taoliou !
En Breiz-Izel, kaerra¹⁸ lidou !

« Warhoaz ‘vo klevet, a gredan,
An oll Varzed a zo amañ

¹⁷ Ne zo bet greet : tregerieg : n’eus ket bet bet greet.

¹⁸ kaerra : tregerieg : kaerrad ?

En Breiz hag en Gall¹⁹ o kanañ,
O kanañ da veuleudiou,
Skriagnag, hag ho re, priedou,
Rag herie, o ! gwella skweriou !

« Gand da skridou, Alfred Lajat,
Gand da deenn, Mab-an-Argoad,
Ted 'zo, da Vreiz, eur skoazell vad.

Gand da wiskamant euz a Skaer,
Ozah yaouank, te a zo kaer
Ha lugernuz 'vel an heol sklêr.

Mez c'hwi, gwregig, 'vel eur rozenn,
Rouanez bleuniou an dachenn,
C'hwi 'zav 'uz d'ar re all ho penn.

N'eus ket koantoh, an oll hen goar ;
Ho tal a zo gwenn 'vel ar hoar,
Ken seder oh hag al loar.

O ! pegement eh eo joauz,
Labourer al Liorz hañvuz²⁰,
D'ho kutuill, rzoenn eüruz !

Ra po ho-taou bennoz Doue,
Ha joa bemdez en ho puhe',
Hag ar Peuh peurbaduz goude ! »

¹⁹ Gall : Frañs.

²⁰ hañvuz : deuz an hañv.

Klemm ar barz disanvezet

Da betra 'talv eta genel ?
 Ne zo²¹ dre oll 'med fallagriez :
 Gouela 'reom en or havell,
 Gouela 'reom 'pad or buhez.

Ha bet on-me heb huanad
 Eur zunvez, eun devez hepken ?
 An douar koulskoude 'zo mad,
 Mez pegement²² fall eo an den !

Baleet 'm-eus 'n em yaouankiz :
 N'am-eus gwelet 'med skwer hudur,
 Ha distroet on war ma hiz,
 Bepred hep peuh na plijadur.

Ha setu-me bremañ em bro :
 Ar mêziou 'zo 'vel diagent,
 Mez me 'zo 'vel eun den maro
 Evid mignoned ha kerent.

N'int kedt 'vid klevoud ma spered,
 Hag ouz ma mouez eh int bouzar ;
 O daoulagadou 'zo stouvet
 Ha ma re gleb gand ar glahar.

O ! mar befe c'hoaz evidon
 Eur hornig douar ankouezet,
 Eun enezenn, 'n kreiz ar mor don,
 'Vid astenn ma horv distronket !

Eur horn, eun enezenn hep tud,
 Mentet deuz ma hed ha ma led,
 Leh n'arrufe biken ar vrud
 Deuz pezh a dremen war ar bed !

Mez, siwaz ! en Amzer Nevez,
 Evidon ne zo ket²³ distro :
 War ribl ar mor, er hoajou gouez,
 Dre oll an den fall ma havo.

War betore hent mond brema',
 Pa welan arru ar gozni,
 Pa n'am-eus breur 'vid ma skoazia
 Na bugel 'vid ma frealzi.

Gwasa²⁴, gwasa trisridigez !
 Ma fenn a gouez war va barlenn...
 Trehet eh on gand an enkreiz...
 Trohet 'm-eus kerdin ma zelenn.

²¹ Ne zo : tregerieg : n'eus

²² pegement : pegen

²³ ne zo ket : tregerieg : n'eus ket

²⁴ Gwasa : gwasad

Frealziez²⁵ d'ar barz koz

Hadsao ! korv ha spered, hadsao !
 Mez dit da goueza ken izel !
 Dond 'ra an heol goude ar glao
 Hag ar peuh goude ar brezel.

Piou 'ta 'zavo uhel e benn ?
 Piou 'ta 'roio d'ar bobl skwer vad ?
 Piou 'ta 'vago 'n herminig wenn
 Ha goude 'n east 'glenko an had ?

Ar pez eh-eus diouganet,
 Abred pe diwevad arruo ;
 Mar out gand herie goapaet,
 An amzer-da-zond az meulo.

C'hwez an tan e-barz an oaled
 Ha lak enni eun tagos²⁶ braz,
 Ra vo eur hlaouenn c'hoaz kavet
 Gand ar re a zeuio warhoaz.

Pa welez arruoud gwalleur,
 Eur goañv kaled, du ha garo,
 Diskarg an ivoul er hleuzeur,
 Ra vo en-pad an noz golo.

Pa vo savet eur rumm tud all,
 Pa vo deut an Hañv war or bro,
 Pa ne vo kabestr nag hual,
 Na kalonad, poan na daero'

Pa reno an eürusted
 En Breiz-Izel, savet war-benn,
 E vo soñj az-po labouret,
 'N-pad da vuhez, 'vid he divenn.

N'az-po ket da lod euz ar joa,
 Herez neuze da bep hini ;
 Da gorr ludu ne vo netra,
 Mez da ene 'vo en dudi.

Hag en uhelder an Neñvou,
 Meh 'mañ Sent ha Sentezed Breiz,
 He Rouanez war o zroniou,
 Hag ar Varzed koz en o hreiz ;

Ar Varzed war o zelennou,
 E-pad ar Vuhez Peurbaduz,
 O kana Breiz, ha burzudou
 He mibien 'vo bet didrehuz ;

²⁵ Frealziez : frealzidigez.

²⁶ tagos : skod.

En uhelder Breiz an Neñvou,
Da ene a vo frealzet
O weled, 'uz d'an oll broiou,
Da Vreiz-Izel c'hoaz hadsavet.

An amzer koz keltieg

En amzer goloet gand an deñvalijenn,
 ‘Barz an amzer²⁷ goz-koz, ‘raog an amzer gristen,
 Ken koz, ken eo kollet diouti an eñvor,
 Moarvad nebeud amzer goude dihlann ar mor ;
 Gouenn veur ar Gelted, savet ‘barz an Azi
 ‘Ziskennas d’an Urop da glask douar ha ti.

Ganet ‘n eur vro e-leh e oa c’hoaz an doare
 Deuz an Tadou kenta, kelennet gand Doue,
 Noe hag Abraham, hag an oll Dadou-Braz,
 War ar meneziou seh, en-kreiz ar hoajou glaz,
 Dre-oll ar Gelted, e leh e tremenent,
 En enor da Zoue a zave mein divent.

Ar sklêrijenn genta ‘zo bet ganet skuillet
 War an douarou gouez heb reiz hag heb oaled.

*

Darn a lar : D’ar houlz-se ne oa ket c’hoaz digor
 Ar striz a zo brmañ karzet ‘tre an daou vor.
 Ne oa ket c’hoaz ezomm deuz ar mordead
 Evid mond da Vreiz-Veur : an dud a yee war droad.
 Mez tud all gouizieg a lavar c’hoaz ive’
 ‘Oa Breiz-Veur enezenn a-grenn war-benn neuze.

N’eus forz, treuzet gante Striz-vor pe Gour-enez,
 Peb rumm, er vro nevez, ‘zavas rouantelez.

Mez an oll Gelted ne dreuzjont ket ar mor,
 Rag eun nebeud rummou’ziskennas en Arvor.

Arru en Penn-ar-Bed, en Breiz, an dud heb doan
 A zistroas war gleiz beteg ar Mor-Bihan.
 « N’hellom ken mond pelloh... amañ ‘vo an diskuiz ;
 Soñjom eta bremañ da zevel eun iliz. »

Neuze ‘welas ar Bed pezh ‘n-oa ket gwelet c’hoaz :
 Brasa labour bet greet war an douar biskoaz.
 Den ne oar ped bloavez, ped kant vloaz marteze,
 E padas al albour greet en enor Doue.

Ugent milier mein-hir, plantet evid biken
 War an dachenn ‘n o zav, a zouge an doenn ;
 Mez an doenn ‘oa skañv neuze d’an ilizou :
 Ne houled evite nemed bolz an neñvou.

Dirag iliz Karnag, mez beza ‘vefe dall,
 Mezevenni ‘ra ‘n den o soñjal en gwechall.
 « Peseurt tud a oah ‘ta, o ! ma zadou ker !
 Ha pegen bihan om herie en ho keñver,

²⁷ amzer : gourel eo amzer, mez lakaet e vez gwregel gand eur bern skrivagnerien.

Pa oah kap, er houlz-se, dre gorv ha dre spered,
D'ober al labouriou ol lak c'hoaz estlammet !
Hogen ivez keid-mañ, du-ze, 'n tu all d'ar mor,
D'an Doue Peurbaduz e rit memez enor.
En oll broiou Breiz-Veur, evel en Iwerzton,
Deuz an Amzer Goz-se eo chomet bo o houn. »

*

Meur a rumm tud all, deut war-lerh on hini,
'Zo bet gwelet buan o sevel, o kreski,
Hogen ken buan all eh int oll tremenet
Ha war dismantrou e van ar Gelted.

Mar n'on-deus ket savet, evel en broiou 'zo,
Paleziou kizellet kreh-ha-traoñ ha tro-dro,
Eh eo abalamour lezenn an Amzer Goz,
Lezenn ar Gwir Doue, a zouge he malloz
War an neb a wallje tremm an douar ken kaer
Hag a skoje eun taol war labour ar Hrouer.
Bouhal ne ziskare ar gwez 'barz ar hoajou,
Na morzol ne dorre eur mên 'barz ar parkou.

*

Beleien an Amzer, an Drouized santel,
A gelenne d'ar bobl n'eo netra dim mervel :
« Petra eo ar maro, 'med hanter ar vuhez ?
Eur ouel roget zouden 'raog eur vuhez nevez ?

Savet deuz a netra, an den 'ra 'med tremen,
Mez e vad-oberou hen sav d'ar sklêrijenn.
Waz d'an hini a heuill an hent a ya d'an Droug :
E binijenn, pelloh, a bouezo ar e chouk,
Evid mad e nesañ, an hini a varvo,
En tu all d'ar maro, uehlloh e savo.

Maro ! buhez ! maro ! ha buhez ar Gwenved²⁸,
'Touez ar re a garem, 'barz an eürusted. »

Ar Feiz-se 'ree d'ar bobl selloud ouz ar maro
Muioh gand joaiusted 'vid gand doan na dareo'.
Er brezeliou euzuz, 'raog ar riskl o redeg,
Biskoaz ne zo gwelet²⁹ paotred ken kaloneg.

Ker 'zo lared ivez e vevent 'mesk ar gwez,
Evel al loened mud hag evel an dud gouez,
Ne oa bet, d'ar houlz-se, dindan bannou an heol,
Eur bobl ken gouizieg war Vuhez ar Bed-oll.
Ar wirionez 'luhe en spered an Drouized,
Pennou kenta ar vro, gand o awen urzet.

Ar varzed a gane, war o zelennou aour,
Ar halonou uhel hag ar brasa labour.

²⁸ Gwenved : leh ma vezer eruz, ar baradoz.

²⁹ ne zo gwelet : tregerieg : n'eus bet gwelet.

Awen Doue 'hweze en o ene an tan
Ha war o lerh 'gerze ar bobl, braz ha bihan.
Kap e oant da beuc'haad ar mor don en kounnar,
Ha da gerzed, o zreid distag deuz an douar.

*

Meur 'hini a damall d'ar goz Drouized wenn
Al lazou greet gante war horre an daol-vên,
Mez red zo, 'raog barni an amzer dremenet,
Deuz an amzer nevez distaga or spered.
D'ar houlz-se ar fallagr, distroet deuz ar Vad,
'N-oa pemp bloaz dirakañ evid 'n em wellaad ;
Ha p'arrue 'vitañ an amzer da baea,
Anezañ e-unan 'h ee d'ar maro gand joa.
Bremañ beh ar muntre a bouez c'hoaz war e chouk
Beteg an eur e kouez ar gontell war e chouk.

Nag a den a furnez 'roe e wad da skuill
'Vid distrei deuz ar vro ar gwall hag an drubuill !
Pegen nebeud bremañ a gerzfe d'ar maro
Evid mad e nesañ hag evid mad e vro !
Pegen nebeud herie, d'o ene, 'deus evez
'Leh gwechall e kreded en e zivarvelez !

Nann, n'e' ket³⁰ da gredi 'oa on tadou tud goue'
Re uhel e savent o spered evid-se.

Goude eo e kouezjont, dindan ar Romaned
Ar re³¹ a harluas kredennou an Drouized.

*

Eun den, en eur vro all 'roas c'hoaz e vuhe',
Mez hennez 'oa anvet Jezuz, Mab da Zoue,
E zakrifis a ra da galz ahanom kredi
Penaos gwad or Zalver a oa breur d'on hini.
Ar Skiant 'lar 'nevoia ar Halileaned
Tennet o rumm ivez deuz gouenn ar Gelted.
Pez na heller ket nah ha pezh a zo gwir mad,
Eo 'kemeraz buan ar gredenn gristen troad³² :
On tadou a gave, 'barz ar Gristeniaj
Meur a gredenn heñvel ouz re an Drouizaj.
Pez a ree dienez ar muia da hemañ,
Jezuz-Krist – o burzud ! – hen degase gantañ ;
Da lared karantez an eil 'vid egile
'Ra d'an den 'n em steuzia en karantez Doue.

Ne dleom ket gweled Mestr ar Bed, or Hrouer,
Mann 'med dre e halloud hag a-dreuz e vrazder ;
N'om ket ganet hepken evid on flijadur,
Mez 'vid karoud ivez, 'vel breur, pep krouadur.

³⁰ n'e' ket : n'eus ket

³¹ Ar re : pere, er skrid orin.

³² 'kemeraz buan ar gredenn gristen troad : galleg.

An Drouized vrudet, deut d'al lezenn gristen,
A roas da Jezuz e genta beleien :
Nag a Zant enoret ganim, n'eus ket gwall-bell,
An hini a oa bet Drouiz en Breiz-Izel³³ !
Nag hini a oa deut deuz an tu all d'ar mor,
An hini³⁴ a anvas Doue : Ezuz ha Lor³⁵ !
Er venehi³⁶ santel, a ziwane dre-oll,
Peb manah 'oa eur barz hag peb barz abostol.

*

Mez siwaz ! d'ar houlz-se, ar Zaozon heb lezenn,
Deut deuz broiou ar skorn war o bagou krohenn,
A hweze en Breiz-Veur an tan hag an argad
Ken 'oa du gand ludu pe ruziet gand ar gwad.
Ha ken pell e padas ar brezel milliget,
Ha kemend a Zaozon, bep bloaz, 'deue bepred,
Ken e teujont a-benn da drehi on tadou,
Harluet er hoajou ha war ar meneziou.

'N eur gana truezuz, darn a dreuze ar mor
Evid goulenn sikour digand breudeur Arvor.
Gante e tegasent ar sklêrijenn gristen
An hini³⁷ a lugern war ar bed da viken³⁸.

*

Pleget du-hont dindan ar Zaoz, ha diwezatoh
Dindan an Normaned, argaruz c'hoaz muioh,
En-pad c'hwezeg kantved daoubleget ha moustret,
On breudeur a Vreiz-Veur a zo ankouezet :
Ni on-unan dalhet gand brezelioh gwechall
Ha goude harluet gand treitourien Vro-Hall³⁹,
On-deus trawalh d'ober da ziwall or buhe'
Ken e kolljom an eil deuz egile doare⁴⁰.

Koulskoude a-wechou e teue dim ar vrud
Deuz broiou a Vreiz-Veur e leh e veve tud
Ar re⁴¹ 'vid ar Zaozon n'o-deus 'med kasoni
Hag ar re 'gomz eur yez heñvel ouz on hini.

*

Ya, 'pad c'hwezeg kant vloaz, o Barzed a Gymru !
Ken 'n-oa 'n avel 'c'hweza hag an neñv beza du,
C'hwi a vire bepred, 're da re⁴², an teñzor :
Skiant an Drouized, deut dim dre hoh eñvor.

³³ An hini a oa bet Drouiz en Breiz-Izel : Pehini, er skrid orin. Notenn a-ber "Hirwaz" : Ijina a ra Berthou an istor.

³⁴ An hini : Pehini, er skrid orin.

³⁵ Ezuz ha Lor : ?

³⁶ Er venehi : Er manatiou.

³⁷ An hini : Pehini, er skrid orin.

³⁸ war ar bed da viken : Notenn gand Hirwaz : ijina a ra Berthou an istor.

³⁹ treitourien Vro-Hall : ar Vretoned bet gallekaet.

⁴⁰ Ken e kolljom an eil deuz egile doare : ken e kolljom pep tra. Notenn gand Hirwaz : ijina a ra Berthou an istor.

⁴¹ Ar re : Pere, er skrid orin. Memez mod : "Hag ar re".

⁴² 're da re : ezu an tadou d'ar vugale.

Bremañ, meulom Doue ! Goude eun noz ken hir,
An heol 'ya da bara c'hoaz war on talou dir.
Arru eo an amzer da glask dorn ha skoazell.
Iwerzon, Bro-Gymru, ha Skos ha Breiz-Izel
A zo c'hoaz peder hoar distaget mez beo-mad
En o halonou tomm, o vervi, memez gwad⁴³.

Bugale o-feder d'ar Halt koz heb aon,
Setu, o tihuni, o-deus memez naon.
Na kabestr, nag hual a-berz an Ermêziad !
Re bell o-deus 'n o hreiz kuzet o halonad !
Unaniez 'ra nerz ! Pa vefom unanet,
E vo rouantelez ar bed d'ar Gelted⁴⁴.

Savit 'ta, Barzed koz a bep kostez a 'r mor !
Ar Gwened, evidoh, n'eus na moger na dor.
Gildas, Herve, Kadog, Aneurin, te Marzin,
Liwarc'h-Hen, ha Gwiklan, ha te Taliezin !
Distroit c'hoaz eur wech d'an Abred trubuilluz ;
Grit diouzim Barzed awenet ha nerzuz,
Ra skoio ho mibien o beh diwar o chouk
Ha ra vo deuz ar Bed trohet gwrizienn an Droug.

⁴³ memez gwad : Notenn gand Hirwaz :nasionalist e oa Berthou.

⁴⁴ E vo rouantelez ar bed d'ar Gelted : Notenn gand Hirwaz : iskiz-kenañ !

Hadtro Brizeug

Ha dond a ray eun all ivez war ma menez ?
 Eva ray er vammenn 'leh e pleg ma muzell ?
 Ha tremen a raio 'leh on bet tremenet.

Brizeug

Eur Barz

Petra 'zo 'n ez komzou ? lavar, spi pe arvar ?
 Petra 'oa dirakout, ar joa pe ar glahar ?
 Perag kaoud aon e vijes ankouezet ?
 Na 'h-eus ket entanet kalon ar Vretoned ?
 Abaoe eh ouzom lenn, out or gwella mignon,
 Bugale om-ni dit dre spered ha kalon.

On mammou 'luskellas or yaouankiz tener
 O kana da werziou ken brao, treh d'an amzer.
 Ha dindan ar glazur, or mestrou kaloneg
 A veske 'n o homzou Breiz-Izel ha Brizeug
 'Vid dihuni ennom karantez ar Vamm-Vro
 I a ziklêrie dim da spered 'n ez levro'.

*

Brizeug, ene santel, kalon garantezuz,
 Kalir leun a evaj ken c'hwek ha ken nerzuz !
 Pegement 'm-eus dleet dit-te, me, ar bugel,
 O vêsa ma loened war ar mêziou uhel,
 Ma zreid er gliz-beure skuillet war ar yeot glaz
 En c'hwez ar vamm-gamill⁴⁵ hag ar munudig-braz⁴⁶ !
 'Touez ar barriou gwenan, er bannou o fraoñval,
 Da rimou a nije ivez en-dro d'am zal
 Da levr "Mari" em dorn, ha ma zell en neñvo',
 Me 'wele Daniel ha Pierig Elo.

Da rei ma halonig, p'arruas din an oad,
 O Brizeug ! te neuze roas din da skwer vad.
 Karoud 'ris eveldout an douar, ar hoajou,
 An oabl hag an avel, an dour, ar hoabrennou.
 Gweled 'reen ar re-mañ o vond 'trezeg an êr
 'Vel listri strolladed war lano an oabl sklêr.
 Ma spered 'yee warne d'ober an dro d'ar bed ;
 Gweled a reen broiou kaer pe gaeroh bepred ;
 Bale 'reen 'uz d'ar mor hag 'uz d'ar hoajou don ;
 Ar Hannadur a-bez 'nevoa leh 'n em halon.
 War eur vro vurzuduz, ganin nevez krouet,
 O Brizeug ! te skuille sklêrijenn da spered.
 Eveldout e rois ma halon d'eur baurez,
 Ha koantoh he haven eged eur rouanez.

*

⁴⁵ ar vamm-gamill : ar hramamaill.

⁴⁶ ar munudig-braz : an turkantin.

Pa zeu, d'abardaez-noz, ar Huz-Heol da ruzia,
Pa weler ar balan hag ar brug o krena,
Pa zeu an heñchou kleuz da veza teñvalloh,
Pa ziskenn war ar bed, o vond da hun, ar peoh,
Pa ya d'ar gêr ar zaout en o fenn an ejenn,
'N eur laoskel a-wechou, spontuz, eur vleñjadenn,
Neuze 'kreder klevoud, raktal, trouz dizoare :
Kezeg o haloupad, ha trompillou-arme,
Lez-Breiz a zo er Vro, gand e varheien vad :
Setu-int en oabl ruz, o tremen 'uz d'ar hoad :
Sed' ar Roue Arzur, setu Sent an Arvor :
War an neñv e weler displeget on Istor.

*

Dleoud 'ran dit, Brizeug, beza eur gwir Vreton :
Te eh-eus, pa oan bugel, stummet din ma halon.
Savet 'veldout ivez pell deuz trouz ar hêriou,
Gwella blaz a gaven gand da zorhennadou⁴⁷ !
Da guzuillou ken fur 'neas ma henta noad⁴⁸ ;
Biskoaz 'n-eus dislivet warnon an Ermêziad.

'N ez levr "Ar Vretoned", ken beo ! pebez burzud !
Me am-eus anavezet ha karet ma gouenn-dud.
'N ez fealidigez me 'zo 'n em anavezet,
An hent leh ma kerzan, te 'h-eus hañ diskouezet.
'Vel eur walenn dister, e-kreiz eur chadenn vraz,
A dro hag a zistro, m'hen gra ivez heb gloaz ;
'N em bleaga 'ran ivez 'vel m'eo din-me dleet,
Mez birviken ne vin gand beh ebed torret.

O ! ma breur hen⁴⁹ Brizeug, abostol didamall,
Ra vo meulet da ano amañ hag er bed all !
'Leh e vevez bremañ, er Gwenved lugernuz,
Pa zellez ouzim-ni, ha te 'zo eüruz ?
Petra 'lar Taliezin hag an oll Varzed vad
Pa zegouez deze distrei war Vreiz o daoulagad ?

Spered Brizeug

Ni a vo en ho touez, eur an emgann sonet,
O ! Bretoned kêz harluet,
Biskoaz tostoh ho treh ne oa bet bet c'hoaz gwelet.

Pa lak an Ankou ar ziell
War or bez, or spered a zav, a-denn-askell,
'Leh 'mañ anaon Breiz-Izel.

Dimeuz kelh ar Gwenved, 'leh ma ene 'zavas,
Davedoh pleget gand ar gloaz,
Evid mēsaad an tan, me 'zo diskennet c'hoaz.

Deuz ar Helh stouvet d'an Ankouez

⁴⁷ da zorhennadou : da zorhennou.

⁴⁸ noad : tergerieg : oad.

⁴⁹ hen : koz.

An amzer dremenet ‘n em zisplegas a-bez
D’am spered leun a levenez.

Ma labour, ganin-me barnet ken marhad-mad,
A ziwane, ‘vel ar greun mad,
E-touez ar minerez⁵⁰, hag en donder ar hoad.

Telegg ar barz Taliezin,
Ma leh ‘zo ‘n e gichenn hag e-kichenn Marzin,
A grene a joa ouz ma glin.

En Lez Arzur, dirag marheien didrehuz,
Gwisket en dir ha lugernuz,
E kanis Breiz, ma bro, gand eur vouez kalonuz.

An daoulagadou ‘oa gleb-dour,
Daoulagad ar Vazred, ha re peb berzelour
Estlammet gand an Delegg Aour.

Emaint o tond : klevit or mammou o skrija
En ti pinvig, en ti paourra :
Hennez ‘vezo eun drud⁵¹, ‘zo bugel o ouela.

*

Prezeget ‘m-eus an dud dister,
‘Vid ma vo dastumet an ed war bep solier,
War-benn m’arruo an amzer.

War an telennou koz ‘m-eus trohet ar herden,
Kerden dir ‘zo war bep telenn :
An dir gweñv ha krenuz na dorro birviken.

Er yez komzet gand ho kouenn-dud,
O ! c’hwi ar re⁵² a zav herie deuz an argud⁵³,
Kanit evid sevel ho prud.

Kalon ! war-zao ! Breiziz ! Tra-walh skuilla deaero’ !...
Pa zeuio an amzer haro,
O ! Telenn Dir, lugern e-touez dir an Armo’ !

*

An awen Geltieg

Ar re ‘zo tremenet er Bed, n’int ket maro :
Kavoud ‘refet aneze pa “dremenfet“ d’ho tro.
Kemerit skwer warne, war o doareou mad,
Diwallit da veza biken trubard d’ho kwad.
D’ho tadou marvet, pe dister pe brudet,
Taolit pled da rei leh da veza kounnaret.
Ra vezo evidoh ar Glad ‘vel eun harnez.
Chomit war hent ho rumm evid heuill ar Furnez.

⁵⁰ minerez : ar mengleuz.

⁵¹ drud : ? eun haroz.

⁵² ar re : pere, er skrid orin.

⁵³ argud : ? Marteze “argad“

Mar kollit an hent-se, diwez d'ar blijadur !
'N hoh-unan e chomfet dindan an Tonkadur.
Sal vuioh en-dro dah e welfet berniou tud,
Sal vuioh 'n em gavfet, c'hwi hag ho re, munud.
An hini e kredeh 'oa ho kwella mignon
A skoïou e gontell, joauz, en ho kalon
En-dro d'ho taol, siwaz ! 'vel pe nahfent o gwad,
Ho pugale 'vo mud dirag ho kalonad.
En amzer dremenet, nag en amzer da zond,
Mar eo maro ar Houn, netra ken na welont.

Mez mar heullit an hent ken plên ha ken ledan,
Ho peh a vo skañvoh, bihannoh 'vo ho poan.
Spered an Tadou, hep ho kuitaad nepred,
Diouzoh 'bellao bemdez an Droug-Spered.
Pa vefet glahraret 'teuio eneou mad,
Hag eun dornig tener 'zeho ho taoulagad.
Ar houlz a zo arru evid Breiz bet gwasket :
Tud varo a zistro en korv hag en spered.
Meur 'hini, c'hoaz dister, e-touez ar bobl bemdez
E-neus⁵⁴ hadet enni ha nerz ha feiz nevez.

Ar Barz n'e-neus biskoaz dilezet e valhder,
'N eur gana Breiz, e vro, gand kemend a zouster,
An hini 'n-eus brudet gouenn-dud ar Vretoned,
Hag hadet ar gwiniz a zo bremañ medet,
Brizeug eo distroet 'n ho touez, pebez dudi !
Hogen e vouez, garvoh, a ra d'ho kwad bervi.

Eur an dihun a sko herie en Breiz-Izel ;
Spered an Tadou a gomz war beb muzell,
Eñ a hwez 'n ho kalon an nerz hag an tommder
Evid ma vo savet Breiz-Izel 'n he brader.

⁵⁴ E-neus : o-deus.

An dihun keltieg

I

Eun êl a zo savet ne oar den a beleh ;
 War diou askell nerzuz eo nijet 'uz d'ar hreh ;
 E drompill lugernuz a skuill dre-oll an neh.

Petra 'zo a-nevez ? Arru 've an diwez ?
 Krenadurez ar houevr a ya da foñs ar bez...
 Hag arru ve an deiz d'an Hadhanedigez !

*

Den, te 'pa re uhel da benn,
 Den hep kalon, den heb lezenn :
 Arru eo da goulz da zsikenn.

Ganit ar frouez 'zo kutuillet,
 Ar bleun 'zo gand da alan skaotet,
 Ar bed 'zo ganit dismantret.

Gwallet 'h-eus labour ar Hrouer ;
 Den digalon, den dibreder ;
 Achu evidout an amzer.

*

Keltia ! Keltia ! dihun ha sav d'ar hloar,
 Keltia bet moustret ken pell 'barz an douar,
 Sav herie, Keltia, Gouenn zantel, Gouenn dispar.

Ar bed a oa kollet, ar bed 'yee da vervel ;
 A-raog arru an eost, an dud a oa gwastell⁵⁵ ;
 Ed na zo er hrignol, na bugel er havell.

Dit-te, o ! Keltia ! da zavetei ar bed ;
 Te 'gleuzo an irvi, te a hado an ed ;
 O ! Keltia zantel !, te 'harzo ouz ar Red⁵⁶.

II

En pevar gorn eur goz vered,
 'Leh ne oa nemed strouez gand ar yeot hir mesket,
 Pevar mên-bez 'zo 'n em zavet.

Eur vaouez a zo deeut e-mêz a bep bez,
 Ha dindan bleuniou ar roz gouez,
 Da ziluzia o bleo int eet en ho hoazez.

Ar bleo a goueze war o lerh
 Fonnuz ha brao hag hir, hirroh 'vid ar foll-gerh,
 Munud, gwennoh eged an erh.

⁵⁵ gwastell : echu e oa an dorna.

⁵⁶ ar Red : ar pezh a zo red.

Eva a reent c’hwez-vad an ivin hag ar beuz...
Bannou an heol, o tond a-dreuz
D’ar gwez, a skuille luh en o daoualagad kleuz.

An nerz a zeue tamm-ha-tamm
D’ar peder c’hoar, ar re⁵⁷ ‘oa ivez peder vamm,
Ha setu-int deuet yaouank flamm.

I ‘oar penaoz, eun tu bennag ‘barz ar vered,
He-deus eur hoar douaret,
An hini⁵⁸ a zavo, pa vo an eur sonet.

Hag ar pemp c’hoar ‘zo boudigou :
Ar maro ‘zo ‘vite eur housk. Falh an Ankou
N’hall ket kregi en o horvou.

*

Goude ‘n nebeud amzer, tremenet en arzao,
Ar c’hoarezed, yaouank ha brao,
War eun dro en em gav, ‘barz ar vered ‘n o zao.

Eet int an eil da gaoud eben :
Hag an teir yaouanka war galon ar hoar-hen⁵⁹ !
Hag homañ, gand ar joa, a gren.

« Hirra⁶⁰ hun hoh-eus greet ! « a lavar Gwalia.
Abaoe oh kousket ped kant vloa’ !
Em bez me ‘oa dihub, an anken am hrigna...

N’hallen ket sevel ma-unan :
Ar mên a oa ponner ha ma mouezig, dindan,
Ne oa ‘med eul lommig alan.

P’eo arruet an eur merket gand ar Hrouer,
Eo pellaet ar mên ponner
Hag em bez diskennet, gand an deiz, an tommder.

Setu-ni bremañ dihunet
Mez abaoe om er bez, nag a dreo⁶¹ bruzunet
Labourom on-feder kevred. »

Ar peder c’hoar, Kymru, Breiz, Skos hag Iwerzon,
Unanet gante o halon,
‘Deus dispaket neuze teñzoriou kaer o houn.

Hag eh arruas hebdale,
Deut da bedi d’ar vered koz, pe da vale,
Eun nebeud deuz o bugale.

Da virviken ar gwad a gomze d’ar Gelted :
Trida ‘ree ‘n hekleo o kleved

⁵⁷ ar re : pere, er skrid orin.

⁵⁸ An hini : Pehini, er skrid orin.

⁵⁹ hen : hena.

⁶⁰ Hirra : tregerieg : Hirrad !

⁶¹ nag a dreo : tregerieg : nag a draou

An hirvoudou joauz etrezeg ar vered.

« O ! ma mammig, ma mammig ker !
A lare peb bugel, ma mammig, deut d'ar gêr,
O ! nag a joa a vo emberr ! »

III

D'enori o mamm geltieg,
Aotrou, micherour ha tieg,
Ar vugale n'int ket dieg⁶².

Ar garantez 'zo dihunet,
Gwad ar galon e-neus bervet,
Mouez ar vamm a zo selaouet.

Peb mamm a lavar memez tra :
« Bezit unanet, ha netra
Ne zeuy a-benn d'ho tismantra. »

Gwasket dindan ma enebour,
Laeret eo bet frouez ma labour :
Ma spi bepred chomas en flour.

Bet on taget, bountet er bez,
Ha ken moustret, en gwirionez !
Chomet eo ennon ar vuhez.

Eun dra greñvoh 'vid an dero,
'Vid an houarn, 'vid ar maro :
Ma ene da viken 'zo beo.

Na pa ve greet dah c'hoaz gwasoh,
Mar am harit, dreist-oll, en bloh,
Ma ene e vevo ennoh.

Lezit ar chas droug da harzal,
It hoh hent, ho kalon feal ;
Mervel a ray ar gouennou fall.

Hag hervez 'lar an Drouized,
Goude an drubuill, an Abred,
C'hwi 'vevo en peuh ar Gwenved.

IV

En-dro d'an daol-vên, ar varzed,
Barzed Keltia 'zo bodet.
O Dublin ! O Dublin ! nag a joa 'zo ennout :
Leun eo ar halonou gand ar feiz en Darvoud.
Kleze Arzur ha banniel ar Gorsez
Ha korn Hirlaz, o levenez !
A lugern herie 'barz an êr
War hlazenn an Ti-Kêr.

Ar varzed 'zo deut a-bell vro,
Darn deuz a Gerne-Veur, hanter-varo,

⁶² dieg : dieguz.

Mez an hini⁶³ ‘zavo d’he zro ;
Darn deuz ar Skos ha Breiz-Vihan,
Ha darn all deuz enezenn Man ;
Darn all, dreist-oll, bezint meulet !
Deuz Bro-Geumru, gwella barzed !

Ar bobl, entanet he lagad,
A zell, oh hadgenel, ar Glad,
En he hreiz e lamp he halon :
Dond a ra dezi nerz eul leon.

Joa hag esper ! haddihunet
Eh eo gwad koz ar Gelted !
‘Vel ar sabr, en Nevez-Amzer,
Er hoajou hag er parkeier,
‘Ro buhez nevez d’ar glazur,
Herie, d’ar Gelted, ar houn ‘ro magadur.

Pelloh eged an dremmwel douareg,
En tommder an amzer-da-zond,
Pep hini ‘wel ar vroad keltieg
‘Leh ne vo dienez na spont.

Skwer an unanvez dispaket dirakañ⁶⁴,
A zigor frank spered ar bobl,
Rag dorn ouz dorn e wel amañ
Mab ar paour hag ar priñs, ar bourhiz hag an nobl.

Pell deuz spered ar gouennou all,
Pell emañ on spered ;
Ha gwaz evite mar int dall,
Ni ‘zo sklêrijennet.
Breudeur om oll, pinvig ha paour,
Ha barz ar huzuillou
N’eo ket muioh Pennher-an-Aour
‘Vid Penn-her-an-Truillou.

Noblañs om oll, braz ha dister,
Dre gozni ha glander on gwad,
Ha dre onestiz on esper,
Gouestlet d’ar Mad.

Hadskoulmet eo an neudennou
A heuill an hent e-kreiz an noz`
Ha ni a ya bremañ da zevel, er bannou,
Pa ‘mañ ar gouennou all o tiskenn en o foz.

*

An Arh-Drouiz, gwisket en gwenn,
Eur houzugenn aour ‘n gerhenn,
Ken gwenn e vleo ! En e veurder,
Eñ ken heñvel ouz an Doue Krouer !
Teir gwech e-neus goulet⁶⁵, e galon strafuillet,

⁶³ an hini : pehini, er skrid orin.

⁶⁴ dirakañ : dirazi. Gourel eo ar ger “pobl” evid Berthou.

« Ha Peuh a zo etre ar Gelted ? »

« Ya, peuh a zo, an oll moueziou
A gas d'ar bed-oll ar helou.

Selaouit Kelted Breiz-Izel ha Breiz-Veur,
C'hwi, re ar Stadou-Unanet,
Ha c'hwi oll divroet, war ar bed stlabezet,
Setu sonet an eur.

Dirag Speerd on Gourdadou
A heuill ahanom dre-oll a-dreuz ar hantevejou,
'Uz d'eur mênhir, gwir arouez an Hirbad,
An oll Varzed, en eur bodad,
O-deus savet o dorn an eil gand egile.

Ya, sonet eo an eur, rag setu greet al le.

Greet eo al le evid biken !
War ar mênhir 'zo⁶⁶ merket pemp lodenn
Evid arouezi ar pemp bro
O-deus greet souza ar maro.

Bremañ ouz ar mênhir on gouenn 'zo heñvel :
An tan, ar glao hag an avel,
An amzer hag an Droug-Spered,
Netra n'he gwallo ken nepred.

Savet eo bremañ ar malloz
Kouezet war ouenn ar Gelted ;
Daou vil bloaz 'zo 'oam hen gortoz :
Setu ar pardon diskennet.

« O ! Krouer ar bed, pegen pell
Eh om chomet 'barz an Islonk !
Mez te, Oll-Halloudeg, te eo seder da zell
Dirag ar joa hag an difronk...

« Waz⁶⁷ d'an hini a goll e hent
Hag a ya war diskenn en Abred trubuilluz.
Red e vezo dezañ sevel 'vel diagent
'Vid gonid ar furnez hag ar joa hirbaduz.
Laket am-eus ahanout er bed
Ken pell deuz ar fall hag ar mad,
Mez libr out da wellaad da stad
Dindan lezenn ar Red. »

War an douar ledan, gwir eo om stlabezet
Med a-raog mond da vrojata,
An unvaniez-mañ 'dle beza da genta
Eun unvaniez a spered.
Goude 'teuio an hini all
Hag e hounezfom adarre
Ar galloud a golljom gwechall

⁶⁵ goulet : goulennet.

⁶⁶ 'zo : tregerieg : ez eus.

⁶⁷ Waz : Gwaz (tregerieg).

An deiz 'oa rannet on hevre.

Soñjom eh om ar peurvuiañ
Diberhennet deuz on danvez ;
Labourom adaleg bremañ
'Vid e hadgonid a-nevez.

Touet hoh-eus, Barzed, dirag ar Re Varo,
Dirag an Arh-Drouiz, dirag kleze Arzur,
Boud 'vel ar Varzed koz o-doa 'n o dorn ar stur :
Leaned⁶⁸ ar Gwir hag ar Vro.

V

Eun den gouizieg :

Gand an oll skiantchou ma fenn 'oa leun a-leiz :
Petra ober gante ? Ma spered 'oa direiz,
Herie me 'oar : Me 'zo dit, oll, o ! ma mamm Breiz !

Eun oberour

N'eo ket er hoajou don 'oan taget gand ar bleiz...
O ! kêriou milliget, e-leh e oan en prez !...
Gwreg ha bugaligou, distroom d'or mamm Breiz.

Fañch Kouer

Petar 'zo a-nevez 'barz ma lojeiz ?
Ar gwad 'red buannoh 'barz ma halon gerreiz...
Biskoaz n'am-eus gwelet ken kaer mêziou ma Breiz !

*

Keltia goz a gan he son – em hreiz
O joa ! ne zo 'med eur galon⁶⁹ – eur feiz,
En Kyùru, Skos hag Iwerzon – ha Breiz.

*

Eun avel vraz 'zo tremenet...
An hini 'werl sklêr 'n-eus gwelet
A-uez d'ar Bed diou askell divent astennet
Arru eo Ren ar Spered.

⁶⁸ Leaned : = mevelien.

⁶⁹ ne zo 'med eur galon : tregerieg : n'eus...

An Diwriziennet⁷⁰

« Peleh 'out o vond, 'vel eun dall ? »
'Houlenn Kezar⁷¹ digand ar Gall⁷².

« Me n'ouzon ket, eme hemañ,
Kollet 'm-eus ma hent, a gredan. »

« Ahanta, doug ma beh dioustu ;
Mez ne vefom ket ni arru

En penn ma hent 'raog pemp kant bloa',
Rag c'hoaz am-eus da vroiaata.

Ha pemp kant bloaz 'n-eus ar Gallo⁷³
Douget samm ar Roman garo.

*

« O vond peleh 'out, 'vel eun dall ? »
'Houlenn ar Jerman gand ar Gall.

« O vond peleh ? me n'ouzon ket :
En hentchou treuz, me 'zo kollet. »

« Hag a beleh eh out o tond ? »
Eme ar Jerman divergont.

« Ankouezet 'm-eus ano ma bro,
Ankouezet ivez ma ano. »

« Kemer ma beh ha kerz buan,
Pa n'ouzout an hent da-unan. »

Ha trizeg kantved, dre e vro,
Ar Gall a dro hag a zistro ;
Forban⁷⁴ en e vad e-unan,
Gwalleuruzet⁷⁵ gand ar Jerman.

*

« Peleh 'out o vond, skañvelard ? »,
Eme ar Judev kromm ha lard⁷⁶.

« Me n'ouzon ket », eme ar Gall
« Din-me an oll hentchou 'zo fall. »

« Fall an hentchou ? Ne welez ket
'Int gand da vreudeur re bleustret ?
Sed eur gontell : kerzom, ha ni

⁷⁰ An Diwriziennet : galleg : An hini diwriziennet.

⁷¹ Kezar : Cæsar, hini Aliesia.

⁷² Gall : Ne oa "Gall" ebed en amzer-ze, mez "Galianed". Ober a ra Berhou gand ar gr galleg, "Gaulois", e-barz e droidigez e galleg

⁷³ Gallo : Galian.

⁷⁴ Forban : disheritet.

⁷⁵ Gwalleuruzet : gwasket.

⁷⁶ ar Judev kromm ha lard : gouennelour e oa Berthou.

O lazo, hini hag hini. »

Ha fuloret e zaoulagad,
Ar Gall e-neus skuillet ar gwad.

« Ro din bremañ, o ! ma aotrou,
Talvoudegez ma zorfejou. »

« Stouv da henou ha labour stard :
Herez ebed 'vid ar bastard !
Ganet eh out evid dougen
O beh d'an oll dud a dremen.
Ne vi biken nemed mevel
Din pe d'eun all, beteg mervel.

*

Hogen teremn 'reas eur Breizad,
Uhel e benn, sklêr e lagad :

« O vond peleh eh out⁷⁷, ma breur,
Daoubleegt dindan ar gwalleur ? »

« Me n'ouzon ket, eme ar Gall...
Na, pe mond amañ pe leh all ?...
Eur mestr nevez am-eus herie,
Falloh kant gwech 'vid egile. »

« 'M-eus aon eh-eus ankounac'haet
Piou out ha peleh out ganet :
Deuz petore gouenn 'saill da wad ,
Pehini eo herie da noad⁷⁸ ? »

« Laret 'zo⁷⁹ din 'on bastardet
Gand Romaned ha Jermaned.

« O ! gwalleuruz ! o ! gwalleuruz !
O ! planedenn pegen euzuz !...
Skwer d'ar re 'dro o daoulagad
Diwar sklêrijenn wir ar Glad !...

Ar vro-mañ eo bro da Dadou,
Leh out o poania en truillou.
Ma'z-pije dalhet d'he divenn,
Herie 'vefe uhel da benn.
Na out na Roman na Jerman :
Kelt 'out eveldon ma-unan,
Ha mar heuilhez ma henteliou,
Te 'gavo c'hoaz da goz roudou. »

« Ro peuh, ha na dorr ket ouspenn,
Gand da gomzou teñval, ma fenn.
Kerz d'an tu-ze, me d'an tu all :

⁷⁷ eh out : tregerieg : emaout

⁷⁸ noad : tregerieg : oad.

⁷⁹ Laret 'zo : tregerieg : Laret 'z eus

Skourjez ma mestr 'zo o strakal.

Kerz 'ta ! Kerz 'ta ! bete mervel,
Dindan an Estrañjour mevel !...
Ankounac'haet eh-eus, paour-kêz !
Yez santel on tadou, ma yez.
Ne glevez 'med ar yez haouiad,
Kelennet gand an Ermêziad.

Heb bro ! hep koun ! heb glad ! heb yez !
Diskenn, paour-kêz Gallo⁸⁰ ! er bez.

⁸⁰ Gallo := Galian.

zDihun Breiz

Piou eta ne welas, war lein ar menezioù,
Arzur, ar Roue meur hag e dud a vrezel ?
Arzur n'eo ket maro. Lemmom or hontelioù,
Da droha 'n hualou 'zo en treid Breiz-Izel...
Barzed, dornatit 'ta kerden an Delenn dir,
Sonerien, c'hwezit 'ta en ho sah binio' :
Breiz a zo disparlet, dihunet eo 'vid gwir.
« Arzur, roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

Abaoe pemzeg kant vloaz, on-deus gwelet ni oll,
'Mesk ar hoabrennou gwenn a nij en tarz-an-deiz,
Pe 'mesk ar houmoul ruz a lugern d'ar huz-heol,
Brezelourien spontuz hag Arzur en o hreiz.
O hlezeier ponner 'hijent 'uz d'o fenn :
Reuz d'an enebourien ! Ar hlezeier 'falho
An izili evel an ed war an dachenn :
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

Gallet hoh-eus or plega, enebourien durbard,
'Pad eur pennad amzer rei lezennoù dim-ni ;
Mez prestig 'arruo an devez kaer ha sard
E-leh e vo red dah diouz ar vro dilehi.
Ha ne glevit-hu ket an douar o fiñval !
En bered pep parrez, euz pep bez 'sav klemmo' :
« Ponner eo an douar moustret gand an dud fall... »
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

En Breiz e vez kavet tudou nehet o vond,
Pa deu an abardaez, ne oar den da beleh ;
Ha ruza a reont, kentoh 'vid ma kerzont,
Entre an hentchou-treuz en eur hija o breh...
Kasit armou-brezel war bez an anaon :
Felher lemm, bouhalioù, krenn-vizier ha gwallioù :
Maro ha beo eh efom, pa 'vo 'n drompill o son :
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

O ! kanit 'ta, Barzed, reudit ar herden dir,
Ma vezo skiltrusoh Telenn an Emgannou.
Tud ouizieg, lakait an tan-gwall en peb gir⁸¹ ;
Paotred Kernev, c'hwezit, gouezeg, 'n ho piniou.
C'hwi oll, paotred a verv, en ho kalon, ar gwad,
Dindan ar vaherien a hoarz ouz ho poanio',
Savit ho mouez d'an neh, en Arvor, en Argoad :
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

Kanom oll, war-eun-dro : « Breiz eo ar vraoa vro,
Mui eged ar Breizad, den ne zo⁸² kaloneg :
Muioh leal ne zo, 'zo bet⁸³, nag a vezo ;
Ar wirionez, 'tiveness 'n e-unan 'eneb deg,
Re bell an Ermêziad 'n-eus c'hoariet gantañ,
En-kreiz e nerz, prestig al leon a zavo.

⁸¹ gir : tregerieg : ger (evid ar rim).

⁸² ne zo : n'eo.

⁸³ ne zo, 'zo bet : tregerieg : n'eus, n'eus bet.

Triubarded digalon, souden 'hallfet krenañ ;
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

Eur vro evel homañ, mervel biken ne hall !
Tud evel ar re-mañ 'eilhan 'n o bugale !
Meur 'wech on-eus skuillet or gwad evid Bro-Hall,
Gouzom 'ta hen skuilla evid or Bro ive'.
Or zent on divenno pa'h om dimeuz o gwad,
Ken pell ma vo lagad Doue war on farko'.
Er Bed, evel en Neñv, Breiz-Izel a dle pad⁸⁴ :
« Arzur, Roue kadarn, te n'out ket c'hoaz maro. »

⁸⁴ pad : padoud.

Galv d'ar Vretoned

Evid Doue hag ar Vro

N'am-boa ket laret dah, pell 'zo,
E vijem moustret en or bro ?
Penaoz n'or-bije nemed gwall
E-leh karantez deuz Bro-Hall ?
Penaoz e vijem hualet
Evel ar zaout hag an deñved ?

Ne welit ket ar hontelliou
O lugerni 'uz d'ho kougou ?
Selaouit avel ar maro
O plega ar gwez war ar vro.
Me 'lar dah eo arru an deiz
'Vid mervel pe trehi en Breiz.

An deziou-mañ 'zo bet gwelet
Treitourien gand ar Hallaoued
O veuli 'n amzer a drubuill
'Oa distanket or gwad da ruill.
Dond a reont d'on difial
Kazell-ouz-kazell gand ar Gall.

Ha red 'vo dim plega on fenn,
Evel deñved heb 'n em zivenn !
Lonka, hadlonka kalonad,
Ha lakaad dour bemdez 'n or gwad !
Harlink am-eus 'n em ivinou,
An den a skrign en em genou.

'N em dagañ 'ran gand ar fulor,
P'az kwelan, o ! ma bro Arvor,
Ne zigori da zaoulagad
Mez pa vo distanket da wad !
Ma halon, 'n eur parkad burlu,
A lamp d'ar pevar, 'haloup ru'.

*

A ! n'eo ket tra-walh ar homzou !
Setu krog ar gwalloberou,
Red mad eo dah bremañ kredi
N'eo ken an den mestr en e di.
Larit din c'hoaz 'ta, o ! tud dall,
N'eo hemañ 'med eun huñvre fall !

Piou a ro troad d'an hailloned
Da skei en hent ho c'hoarezed ?
Hag-eñ 'vefeh-c'hwi a rofe troad
Da zistruja en Breiz ar Mad ?
Larit din hag-eñ 'h-eus biskoaz
Diskouezet d'ho c'hoarezed kas ?

Mar ne larit : foei d'al Lezenn !

Warhoaz «'vo tro ho peleien.
Goude 'serrfor an ilizou,
Ha goude 'laerfor ho madou.
Neuze 'vefet buan staget
Er marchosi, gand al loened.

Abaoe pegoulz ar Vretoned,
A oa gwechall tud ken brudet,
O-deus en o daouarn klogor
Pa dleont divenn an Arvor ?
Petra, daonet 'vo ma eskern !
Petra 'h-eus 'ta c'hoaz da espern ?

Mar 'h-eus kollet ho librente',
Petra 'h-eus c'hoaz da goll goude ?
Gwell e ve din mervel a-grenn
'Vid kaoud eur habestr war ma fenn,
Ha 'vid gweled eun Ermêziad
O ren, en mestr, en ti ma zad !

Ra zavo Barzed Vreiz-Izel
O moueziou kounnaret uhel !
Brasa karantez 'r Gelted,
Al librentez a zo gwasket !
A-raog 'ta, paotred a galon,
Evid sevel 'n ano breton.

An dever

Pa roas an Dukez Anna
D'ar roue gall ar vroig-ma',
An Itron gêz ne ouie ket
'Vije ar roue dibennet.

Pa lare dim : Setu ho tad !
Ne ouie ket e ruillje gwad,
Gwad ar Vretoned, 'vid divenn,
'Eneb d'ar Hallaoued, o fenn.

Ne ouie ket vijem eun deiz
Laket d'ar maro 'vid or feiz,
'Vid on gizioù, or halonder,
Gand ar re'h anvas or breudeur.

Da gurunenn a Rouanez
'Zo koustet dim-ni, Dukez !
N'on-deus ket achu d'he faea
Goude tremenet pemp kant vloa'.

Roet on-deus arhant hag aour
Ha gwad, pinvidig evel paour ;
Or poan a room c'hoaz bemdez
D'ar re 'deus laeret on danvez.

Petra 'rofom 'ta c'hoaz, Anna,
Pa n'on-deus netra ken brema' ?
Roet on-deus on oll mado',
Gwadet om beteg ar maro.

D gurunenn 'oa brao, me 'oar ;
N'eo ket a-walh treo'⁸⁵ an douar
D'he faea, siwaz ! da Vro-Hall,
Red e vo c'hoaz madou 'r Bed all...

Nahet eo bet on Tadou,
Nahet ar yez, ar hoz gizioù⁸⁶,
Ar feiz, ar vuhez peurbaduz ;
Petra 'vezo greet c'hoaz euzuz ?

Botou-koad ha kurunenn aour
On dileh kement en ti 'r paour,
Evel en palez ar roue,
En ez amzer evel herie.

Piou 'ta 'gane da votou-koad,
« Botou-koad an Dukezig vad » ?
Siwaz ! re a lorch 'oa ennout
'Vid mond gand botou-koad en rout !

D'az heul 'h eom c'hoaz da Vro-Hall,

⁸⁵ treo' : tregerieg : traou.

⁸⁶ ar hoz gizioù : ar gizioù koz.

Herie ken paour ha gwechall ;
Or botou-koad 'deus seuliou hern,
Mez or hurunenn 'zo en spern.

O ! ma breudeur ! savit ho tal !
N'eo ket warhoaz : herie, raktal,
'Tleom troha on hualou
Ha sevel uhel or zellou.

Kabestr ebed ! Breiz diere !
Foei d'ar Gallo⁸⁷ hep trugare'
Mestr ebed ken war an douar :
An heol evidom oll a bar.

Kabestr ebed a-berz Bro-Hall !
Mestrez na mestr kennebeud all !
Dim-ni eo da zibab eun den
Mar dle unan warnom-ni ren.

Hag ar gwaz-se 'dleo beza
Deuz or gwad-ni, deuz ar gwella !
Brezi d'ar Vreiziz ! Deze ar vro
Strujusaet gand re varo !

O hwezenn, o eskern, o gwad
A ro sabr d'ar gwez ha d'an had :
Chomom staget ouz an douar
A welas o joa, o glahar.

Anna 'zimezas d'ar Roue
-Daoust hag hi 'rafe c'hoaz herie ?-
Hogen nag herie na gwechall
N'om bet dimezet da Vro-Hall.

Pep hini d'ar gêr, en e vro,
Pe ar gwad amañ a ruillo !...
Breiz-Izel 'zo douar santel :
'Vid e zivenn, kaer eo mervel.

Ar maro 'zo nebeud a dra
Pa 'mañ an ene da bara ;
An den disterra a vo kreñv
Mar lak e oll esper en neñv.

Daou dra hepken d'an den 'zo red :
Beza diere war ar bed
'Vid beva pell deuz an dud fall,
Ha boud eüruz er vuhez all.

⁸⁷ Gallo : Gall.

War-zav !

Goude Saozon ha Frañsizien
Setu arru ar Judevien.
-Ha te 'rankfe da virviken
D'an Ermêziad rei bara gwenn ?
Torr e benn !

Red eo bet dit kuitaad da vro,
Bremañ c'hwzeg kant bloavez 'zo ;
Trezuet 'h eus ar mor eonet
Dirag ar Zaoz – eñ milliget !
Torr e benn !

Doue hepken 'oar pegement
'H-eus skuillet gwad evid divenn
Ar vroig-mañ, evel Breiz all,
'Eneb d'ar Zaoz, 'eneb d'ar Gall
Torr e benn !

Enebourien all a hourdrouz
Da barkeier, da dier plouz,
Da gorv, ha siwaz ! da ene...
Gwechall ar Vreiziz a yude :
Torr e benn !

O ! tadou ! tudou brudet !
C'hwi ne vijeh ket bet gwasket
'Vel e wasker ahanom herie !
Ha gwir om dah-hu bugale ?
Torr e benn !

Ar bobl enebour 'zo arru
War zeul ar vro, hag a bep tu ;
Ar bobl he-deus kurunennet,
Gand drez ha spern, Salver ar Bed.
Torr e benn !

War an oll 'fell dezi rena,
War an eneou da genta...
Mez me 'fell din chom diere
'N em huz-heol 'vel 'n em beure,
Torr e benn !

Ha pa eo red c'hoaz 'n emganna,
Dare mad on 'daleg brema' :
Falh pe bouhal din-me 'vo mad
'Vid lakaad da ruillal ar gwad.
Torr e benn !

Beva evel saout hualet !
Beva 'vel loened mud mouget !
Kentoh kleuzi leur ar vered
Ha rei ma hig beo d'ar preñved !
Torr e benn !

An heol, emezon, 'dle para
Evidout, paour, klasker-bara.
Sav, dirag toull-dor da lochenn !
Sav, divenn mad da grohenn !
Torr e benn !

N'am-eus na Mestrez na Roue
-Ma ene paour 'zo da Zoue-
Eun all ne vo biken ma mestr :
N'am-bo nag hual na kabestr !
Torr e benn !

Breizad, mar zo⁸⁸ gwad ez kalon,
Selaou... 'mañ an Drompill o son...
Arru eo deiz an emgann...
Warhoaz ar gwad ruz a ruillo...
Torr e benn !

⁸⁸ zo : tregerieg : ma'z eus.

Diougan Gwiklan

War don : Ar Falhon.

Klevoud a ran an *Delenn Dir*
O son war lein ar meneziou,
Goude kleved *Hirvoudou* hir
O sevel, noz-deiz, er hoajou.

Respont ‘ra telenn harv ar mor
Da delenn vurzuduz ar hoad,
Ha c’hwistell ar heveleg-mor
Da hourizioù ar gazeg-koad.

Etre Karnag hag ar Porz-Gwenn,
Dre vrukou ruz ar Menez-Bre,
En pep traonienn, war bep krehenn,
Arme Gwiklan a zo dare.

Sevenet eo, euzuz Barz dall⁸⁹,
D’az peurvuiañ diouganou :
Ar gwad kristen, en eur ruillal
E-neus troet ar milnou.

Hag an douarou ar fallañ
A ro gwiniz ‘vel ar re vad ;
Heveleb dispriz ‘zo bremañ
Evid an douar hag ar gwad.

Hebdale ‘vo trubuill en Breiz :
-Pa zavo Gwiklan en e vez,
`Diwar lavar Pedernez⁹⁰,
Deuz ar brezel ‘vo an degouez.

Abaoe eun nebeud bloavezioù,
Ene ar Barz, ‘n em lodennet,
A ree nerz da galonou
Ar varzed vihan ‘zo savet.

Pep hini ‘zouge e delenn,
Etre Bro-Hall ha Breiz-Izel,
En eur denna diouz ar herden
Meuleudi broig e gavell.

Mez an oll delennou bremañ
O-deus unvaniet o zon,
Pa o-deus bugale Wiklan
Eur mennoz hepken ‘n o halon.

Arru eo ‘ta deiz ar brezel ;
Krena ‘ra douar ar “Park Braz“,
Rag setu Gwiklan o sevel
Da rena kann en “Enez Hlaz“.

⁸⁹ euzuz Barz dall : Barz dall euzuz.

⁹⁰ Pedernez : tud deuz Perdernez.

‘Tre “Traou⁹¹ Yeodi“ ha “Louargad“
Demdost d’ar menez, war an hent,
En steriou e ruillo ar gwad
‘Vel e ree an dour diagent.

O ! nag a harm ! nag a zaerou !
O ! nag a gañvou en peb leh !
Nag a gorrvou en Karr-an-Ankou !
Bepred trugarez : Breiz a vo treh !

Biken goude ne vo brezel,
Hag ar peuh a reno dre-oll ;
Hadsavet e vo Breiz-Izel,
Sturiet gand ar wella reol.

Breiz-Izel ‘vo an uhella
Dimezu broiou kaer an douar ;
An oll eneoù ‘vo en joa,
An oll galonou heb glahar.

Sav ‘ta buan war Menez-Bre,
Barz Meur Gwiklan, Diouganer :
Hir eo gortoz beure an de’
N’or-bo ‘med Doue ‘vid rener.

⁹¹ Traou : Traon.

Diougan maro Par-Iz

War don : Diougan Gwiklan (Barzaz Breiz)

Arruoud ray ivez da dro,
‘Vel arruas hini Kêr-Iz ;
Tostaad a ra Êl-ar-Marô,
Kêr an Techou fall, o Par-Iz !

Diouganet eo bet se dit,
Gand eur Barz bennag dizanav...
-Berr an neudenn war da werzid !...
Da lestr n’eo ken nemed eur skav !...

Hervez skrivet gand an Darvoud,
El levr ‘leh ‘mañ or planedenn,
Setu an douar dindannout
Mengleuziet ‘vel eur goloenn.

Dindan palez ar Rouane’
Ha paleziou ar Blijadur,
‘Leh ‘mañ or mestrou dizene⁹²
Hag o gisti a skwer hudur,

Dindan ti ar pinvig lorhuz
Ha ti ar bourhiz dispered,
Ha dindan tu ar gwalleuruz
Ha relegou brein ar vered ;

Dre-oll out mengleuziet, Kêr-Veur,
Evl eur goloenn wenan...
Pa’ruo ‘n nadoz war an eur,
Er mengleuziou ‘krogo an tan.

Neuze ‘starko an tennou poultr ;
‘N ezu frailla pluskenn an douar,
An tan a zavo, ‘vel ar foultr⁹³,
Dimeuz donder euz pep skarr.

O ! Par-Iz brein ! Ploull-ar-Hlogor !
Kovad ! Kernez ! Bosenn ! Dihlan !
Kêr-Iz ‘zo bet beuzet er mor,
Par-Iz, te ‘vo beuzet en tan !

⁹² dizene : heb ene.

⁹³ ar foultr : ar gurun.

An hini goz

War don : Marzin 'n e gavell (nerzuz).

Eun deiz bennag an Hini Goz
A hourvezas 'n he gwele kloz ;
N'eo ket eun noz⁹⁴, n'eo ket eur zun⁹⁵ :
Pevar-hant vloaz eh eo bet heb dihun,
Loñ, loñ la, tra deri loñ la.

En-pad mil bloaz meur a roue
En-doa bet lod 'n harante',
Mez chom a ree beo war o lerh,
Glan heh ene, glan he horv 'vel an erh.

Da ziweza 'oa dimezet
Da roue Frañs, gantañ karet,
Rag killet 'oa bet en-yaouank
Ha halon c'hoaz ken seder, ken dizank⁹⁶ !

Eun abardaez-noz, eur mevel
A hwezas an tan er hastell...
Dibennet eo bet ar roue :
An Hini Goz a zihunas neuze.

Kant bloavez all 'zo tremenet :
An Hini Goz n'eo ket trehet,
Ha kaer a zo skei war war he dor,
Ne werzo ket d'ar mevel heh enor.

An Hini Goz eo on mamm Breiz,
Entanet he halon 'n he hreiz :
« Kentoh, emezi, kentoh mervel,
Ne vo biken kaillaret Breiz-Izel. »

War-laez ! Bugale an Arvor !
Ra zavo ennom ar fulor,
Ar fulor zakr evid argas
Enebourien an hini or magas.

« Lar din-me petra a rafes,
Mab karantezuz, ma welfes
Eun den o tispriz da ouenn-dud ? »
« Ma dorn ponner e lakfe raktal mud. »

« Ne glevez ket an Ermêziad
O troug-komz bemdez deuz da dad,
Deuz da vreudeur ha deuz da vamm ? »
« Mar e glevfen, ne chomfe ket dinamm. »

« Digor 'ta da ziskouarn neuze,
Selaou hag e klevi bemde'
Kaoziou kazuz an dud diroll. »

⁹⁴ eun noz : eun nozvez.

⁹⁵ eur zun : eur zizunvez.

⁹⁶ dizank : dieub.

« Me ‘vefe gouest da skei meur a vestaol. »

« Neuze, warne te a stoko :
Emaint o walla da Vamm-Vro,
O tiskar he brud hag he yez :
‘Vid eur Breizad, kement-se ‘zo eur vez.

Ne welit ket ‘ta e zo c’haont
Da droki dezi he gwiskamant,
He gizioù hag he feiz, koulz all ? »
« Malloz ! malloz ! re bell eh om bet dall ! »

« Truñsenn⁹⁷ dero, dered em dorn,
Me ‘m-eus da frika meur a askorn,
Me ‘m-eus da frailla meur a benn,
Dered amañ, truñsenn vad, ma zruñsenn.

« Tan ha kurun ! din-me e fell
Na stoko den ouz Breiz-Izel,
Gwaz d’an hini a dostaio :
War e grohenn me zino ma ano,
Loñ, loñ la, tra deri loñ la. »

⁹⁷ Truñsenn : penn-baz.

Dousig koant ar barz

War eun ton tennet dimeuz an hini diaraog.

Ma Dousig koant a zo hep par ;
N'eus ket eun all war an douar
Talvoudeg da skoulm' he botou
Na da zevel outi sellou.

Ma Douisg koant a zo kousket
War ribl eur mor glaz eonet ;
An avel a hoari 'n he bleo,
En he bleo gwenn evel ar reo.

A-uz dezi ar hoabrennou,
Ken gwenn, ken skañv, en o hentchou,
A ya goustadig hag a-stroll,
Oh ober d'he dremmig disheol.

Er gwez dero, dre-oll savet,
Evnedigou a gan bepred,
An deiz, an noz hag ar beure,
Da lakaad c'hwekoh heh huñvre.

Rag ma Dousig koant 'zo oh hun,
Abaoe meur a zeiz, meur a zun,
Meur a vloavez, meur a gantved,
Er-mêz, war an douar bleuniet.

Hogen, daoust pegen pell amzer
'Vez tremenet, bepred seder,
En he dremm flour, en he horvig,
Manet eo evel eur voudig.

Evel-se kousket en heh hed,
He horv a wagenn 'vel an ed ;
He bronnou 'zo 'vel daou vene'
Sonn dindan gliz-gwenn ar beure.

He diouharr, he divreh digor,
'Vel steriou lêz o ruill d'ar mor,
A ya d'an eil mor d'egile
A-dreuz ar prajou hag ar gwe'.

Koz eo, 'larer, peogwir he bleo
'Zo gwenn 'vel lin hag evel reo ;
Mez he horv boudig, heh ene
A chom yaouank, en gwirione'.

Pa 'n-eus an Estren he gwelet
Kerkent e-neus he c'hoantaet,
Mez biken, daoust ma'h on bihan,
Ne stoko outi e graban.

O ! dihun 'ta, koantiz Arvor !
O ! sao da zivenn da enor !

A-raog ma vo sehet ma gwad,
Digor, digor da zaoulagad.

Kentoh 'vid gweled tamm kaillar
War da gorv gwenn, da gorv hep par,
O ! ma Dousig koant Breiz-Izel,
Koantiz ha mamm, kentoh mervel !

Kan broaduz

War don : Lez Breiz.

Ni 'zo bugale Vreiziz-Tramor,
Breudeur d'ar Zent dalhet en enor
'Barz en Breiz-Veur hag e-barz an Arvor.

Diskan

War don ; Livadenn Gêr-Iz.

'Raog nebeud amzer, Breiz-Izel 'vo treh,
Hag ar peuh 'reno en peb leh,
Pa zavo Breiziz, nerzuz, o breh.

Rumm ar Vretoned 'zo a-viskoaz ;
Bet eo gwechall gallouduz ha braz
Hag eun deiz 'vo muioh gallouduz c'hoaz.

Eet eo bet Breiz-Veur gand ar Zaozon,
Mez bervi 'ra ar gwad mad breton
En Bro-Gymru, en Skos, en Iwerzon.

An Arvor ivez anavez he gwad :
Gaou ne laro biken ar gwad mad,
Ha treh e vo d'hini an Ermêziad.

Gand Doue or mestr ni 'vo savet
War ar gouennou 'zo en tro ar bed,
Rag ni 'viro gizioù ar Gelted.

Ni 'viro or yez, or yez dispar,
Kaerra hini 'zo war an douar :
Gwalleur d'an den a hoantfe he diskar !

Ni 'gar douar Breiz, madelezuz :
Ne vezer nebleh kement eüruz ;
Enni 'vefom da viken didrehuz.

Ni a vir or feiz 'vel on tado'
Ha nerzuz om beteg ar maro,
Kaletoh om 'vid kalon an dero.

Euz an evaj kreñv, ni a ray kaz,
Pa zo en Breiz gwez-avalou c'hoaz :
Or horv n'eo ket eskern na krohenn kras.

Kaerra bro 'zo 'r bed eo Breiz-Izel,
Diere 'vo, pe e vo brezel.
'Vid he divenn ni a ouio mervel.

Eil maro Renan

I

Setu-me distroet da gêrig Landreger :
‘Vel eur bugel kollet eh on degaset d’ar gêr.
Allaz ! petra ‘laro ma breudeur dre ar gwad,
Pa ‘h on bet evite ken pell eun divroad.

Dorojou an iliz a zo ouzin klozet
Ha ma breudeur, siwaz ! dirakon ‘zo nehet.
Amañ, ‘n em yaouankiz, bugel mad e vevis,
Doujuz d’ar feiz kristen ha doujuz da beb giz.

Adaleg ‘n em gavis e-touez ar Hallaoued,
Eur hleñved didrugar a grogas ‘n em spered ;
An evaj din roet a reas din koll ma hent,
Ha karantez Doue ‘gollis ivez kerkent.

Al lorch hag ar fouge ‘luhas ‘n em daoulagad ;
Ar c’hoantizou uhel a strafuillas ma gwad,
‘Vid beza anavezet dre ar bed oll fonnuz,
Me ‘reas neuze brezel da zouelez Jezuz.

Hep trugarez d’ar paour, ‘mañ e spi er bed all,
War ar gredenn gristen me ‘skoas ‘vel eun dall.
Nag hini ‘n em hlevoud, gantañ kollet e feiz,
‘Vel eul loen ankouezet, ‘zo marvet ‘n e lojeiz !

Bremañ pa’h on maro, bremañ ‘welan sklêrroh ;
Evidon na zo⁹⁸ na brud, madou na lorch.
Ma labour, ‘vel an eost, a zo bremañ gwentet,
An ed hag an dreog ‘zo herie dibabet.

Mez n’eo ket bet kaset al louzou fall d’ar mor :
Gand ma hoz vignoned int hadet gand enor.
Kaerad eost a zavo deuz ar greun milliget !
Kaerad istor dre-oll ! kaerad leiou-touet !

Nag a labour ‘m-eus greet evid degas an droug !
Ar beh a gement-se ‘ra din plega ma chouk.
D’an droug, hepken, Renan en-deus dleet e vrud :
Gand an droug-sperejou eo savet war e glud.

Ha dleoud ‘ran bremañ pe gouela pe c’hoarzin ?
Evid darn ‘h on den fur, ‘vid darn all furlukin.
Kleved ‘ran malloziou, en-dro din, o sevel,
Hag abalamour din, ma bro ‘zo en brezel.

Ha setu-me pignet dirag an iliz-veur,
Gand meur a zivroad ha nebeud a genvreur.
Sant Erwan ‘zo aze enoret ‘mesk ar Zent,
Ha me chomo bepred heb enor ‘kreiz an hent.

Diouzin, tud ma bro ne ouzont eun doare,

⁹⁸ na zo : n’ez eus.

Kaer e kreden beza brasoh eged Doue.
Dirag oll zent koz Breiz, war o daoulinou noaz,
An dud a bed herie 'vel e pedfont warhoaz.

Mez dirakon, biken, ne zaoulino eun den,
Beza vo evidon eur mousc'hoarz o teremenn.
Gand ma daoulagad braz ha ma jodennou teo,
Kement e vin kazet en-marzo 'vel en-beo.

Jezuz, douger ar groaz trehour d'an oll amzer,
En desped d'am spered, te 'ren war an aoter.
Me maro, den maget, me 'ziskenn d'an douar,
Ha te, Jezuz, divag ha treud, te 'zav d'ar hloar.

Kredet am-oa e halljen didroni ahanout,
Digand Doue an Tad lemel e oll halloud,
Mouga an oll dreo' sakr dindan an oll dispri ;
N'on arruet nebleh 'med ouz dor an iliz.

Ahann 'oan dilehiet, amañ 'on distroet ;
Ma-unan 'oan eet kuit, herie 'on degaset.
Ha bremañ pa glevi bemdez taoliou ar hloh,
Renan goz, te 'greno, rag maro eo da lorch.

II

Kleier, kleier am-eus karet,
O ! kleier Landreger, tavet⁹⁹ !
En-pad an deiz 'klevan ho mouez :
O ! tavit, kleier didruez !

An noz e klevan ho morzol
War an arem o skei bep taol.
An heol ne vez ket c'hoaz savet,
Setu tri gloh 'uz din brallet.

Ha beteg kreisteiz an taoliou !
Ar hlaz o son 'vid ar hañvou !
D'abardaez-noz glaz adarre !
An euriou beteg ar beure !

Ar zul, ha deiz ar goueliou braz,
Ar hleier a zon muioh c'hoaz !
Red mad eo din hen anavoud :
O Renan paour ! trehet eh out.

Na, pa vefe ar hleier mud,
Ahann me 'welfe c'hoaz an dud
Oh heul bepred heveleb giz,
O vond da bedi d'an iliz ;

Hag an iliz 'uz d'am skeudenn,
Hag enni al lidou kristen !
Glahar ouspenn ! allaz ! allaz !
War veg an tour uhel, ar Groaz !

⁹⁹ tavet : tregerieg : tavit.

N'houlan ket chom pelloh amañ :
Santoud a ran 'h an da gouezañ.
Pa n'on-me ken netra ebed,
Krist, te 'zo c'hoaz Roue ar Bed !

Pa'h out anavet gand an oll,
Ma brud, tamm-ha-tamm 'ya da goll :
En despet d'an deskadurez,
Ouzin 'houler : « Piou eo hennez ? »

Bezit milliget, tud Pariz,
'N em laket hoh-eus en dispriz ;
Evel don 'h-eus kollet ho poan,
Ha milliget me ma-unan.

III

Eur houër-marhadour, beure mad :

« Sell 'ta ! lamet eo bet heno,
Alese, skeudenn ar paotr koz !
Daosut 'vid petra ha daoust gand piou ,
C'hwistim 've marvet gand ar riou ?

Eur bourhiz, pikous e zaoulagad :

An noz-mañ, klevet hoh-eus-hu
Eun dourni vraz e-barz ar ru,
Trouz eur bern potin o tiskenn
O tiskenn ru ar Gigerien ?

Eur pesketaer :

An noz-mañ, al loar vraz 'oa sklêr :
Me 'oa 'n em bag en-kreiz ar Ster,
Ha me o weled, 'n heh-unan,
'Ruillal er mor, skeudenn Renan.

Notenn gand "Emabnn an Hirwaz " : Kristen penn-da-benn e oa Berthou, a-eneb Ernest Renan.

Vañjañs an Ankou

I

En kastell ar Bilo, an itron a zo klañv,
Kmeent-mañ 'arruas eun noz en-kreiz ar goañv.

Kerent ha mitizien a ye hag a deue,
Skuizet ha penngollet gand eiz noz war vale.

Ar houeñv hag an arhant a lugern er hambrechou,
Strakal 'ra an dero 'barz ar chiminaliou.

Deuz ar hao d'an doenn, an ivoul¹⁰⁰ hag ar hoar
A lak er prenechou eur sklêrijenn dispar.

*

An Ankou, an noz-se, o redeg dre ar vro,
Gand e falh war e skoaz en em gavas war-dro.

« Ola ! 'me an Ankou, petra 'zo 'ta heno ?
Goulou dre-oll !... C'hwistim 'vezed aze em gortoz¹⁰¹ ?

An nor-dal 'oa chomet moarvad digor a-walh
'Vid rei tremeneri d'ar falher ha d'e falh.

Sklokal 'ree an eskern digig ha digrohenn,
Ha, war ar hoad, e dreid kaled ha diarhen.

Mez setu ar Paotr-Treud, dre ar viñs-veur pignet,
Arru du-ze war laez, war ar plañchod koaret

« Suillet 'vo ma eskern, eme ar Falher koz,
Ne luh ket kement-mañ plañchod ar Baradoz !

Dem bepred ! An Itron he-do an taol kenta :
He buhez 'zo luziet, red eo he dikuizia. »

*

Astennet 'n he gwele, an Itron a glemme :
Diraki he herent, dastumet, a harme.

Eun toullad mitizien, o hortoz an diwez,
War bennou o daoulin, a bede ar Werhez.

Ar peuh en ti !... Er-mêz, a-wechou eur gaouenn,
Pe eur hi glaharet 'laoske eur youhadenn.

*

Patatrak !... Petar 'zo ? Jezuz ! Maria ! Kredo !
'N-kreiz ar gambr, war e reor eo kouezet an Anko'.

¹⁰⁰ ivoul : eoul.

¹⁰¹ 'vezed aze em gortoz : e vezrd aze ouz ma gortoz.

« Eur wech all, te ‘ouio penaoz, war eul leur goar,
An eskern seh a ruz well ‘vid war an douar !

Na gredit ket ahanon, mar laran dah eur gaou :
Memez trouz ‘rez o koueza evel eur zahad kraou¹⁰². »

Mez ken buan savet evel ma oa kouezet,
Gand ar foeltr, eñ mezeg, er-mêz eh eo redet.

Hebdale, pa deuas d’an dud o sperejou,
Er pellder ‘wigoure Karrigell-an-Ankou.

*

Dre an hentchou bihan ha kleuz,
Dre ar hoajou, dre ar parkou,
‘Vel eur beulbeuz¹⁰³ gand e benn beuz,
Pa laran, hasta ‘ree ‘n Ankou.

Mond ‘ree, buanna ma halle,
Dre ar mein hag an douar gwag...
« Kement-mañ, ‘mezañ, war ma le !
A gousto ker d’unan bennag. »

Na dour, na lann, na mein, na drez,
Ne divaloue¹⁰⁴ ar reder,
Laket en fulor gand ar vez
Mui ‘vid gand ar boan en e rer¹⁰⁵.

Pa ne zo mann¹⁰⁶ war e eskern,
Ne zo mann evid hen gloaza ;
‘Vid e bikad, na drez, na spern,
Na lamp¹⁰⁷ ebed ‘vid hen bloñsa.

E galon, yen evel ar skorn,
‘Zo hep truez ouz ar glahar ;
N’eo ‘med eur mên, pe eun askorn :
An Ankou n’eus na kar na par.

Mond a ree dindan ar houmoul
A boueze war ar bed teñval,
Pa ‘n em gavas eur hoz ti-soul
A-dreuz dirag e aneval.

Gwaz d’an hini eh eo merket
E di gand an Darvoud henoz !
Hemañ ‘vo da genta skoet...
- An horolaj ‘zon hanternoz.

*

¹⁰² kraou : kraoñ.

¹⁰³ beulbeuz : unan abafet.

¹⁰⁴ divaloue : chome a-zav.

¹⁰⁵ rer : reor.

¹⁰⁶ ne zo mann : tregerieg : pa n’eus mann

¹⁰⁷ lamp : tregerieg : lamm.

Al lutig 'barz ar fornigell,
A zivoged en eur strakal ;
An ozah 'zo war eur goz skabell
En e zaouarn pleget e dal.

Skeudennou 'barz ar hognou du...
Maro ar hev war an oaled...
Er chiminal moueziou Kerzu¹⁰⁸ ...
Daou gorv dister war eur holhed...

Ar wreg hag ar bugelig klañv...
- Allaz ! skrignet 'deus an dorzell :
Ar paour-kêz ozah a zo intañv
Hag an tad a zo heb bugel.

¹⁰⁸ Kerzu : miz Kerzu.

Chomom en Breiz

Erwan, *den koz ha fur, a gomz :*

Ha ne vefem-ni ken Breiziz pennou kaled ?
Ha ne verv ken ennom gwad ar wir Vretoned ?
En-pad meur a gantved Breiz a zo Breiz chomet,
Ha setu-hi raktal, d'he zro disheñvelet !

Saoz na Gall ne zeujont a-benn d'heh huali
Na da rei giz nevez na lezennou dezi,
Keid all 'vid he divenn or gwad e-neus ruillet.
Hag, heb emgann ebed, ni 'vo herie trehet !

'Leh deski anezi eh argaser on yez,
Touet eo he maro gand Gallaoued divez.
Deut eo eta, 'm-eus aon, or halon da wakaad,
Peogwir kalz ahanom a nah herie o gwad.
Nah a reont o yez, nah a reont o Bro ;
Kas 'rafent, dizeblant, o mamm-Vreiz d'ar maro !

Gizioù ha yez Vro-Hall 'zo dre-oll en enor,
Hag or re, harluet, a zous war ribl ar mor ;
Ar gwiskamañchou kaer, ar re¹⁰⁹ 'zisheñvele
Tud reiz e-mesk laeron, 'zo dilezet herie ;
Emaint-i o vreina er hrignol, en eur bern
'Mesk ar harach, ar stoup, ar pillou, an eskern...

Yves, *kenderv Erwan, Breizad bet en broiou pell o kredi en-ije kavet eno arhant da rozellad :*

War digarez gonid arhant hag aour a-leiz,
E werzis ma douar hag e kuitais Breiz ;
Mez ar werenn 'zo pell, siwaz ! deuz ar vuzell !
Rag ne gavis nemed enkrez ha poan varvel.
Al labouriou sammuz 'vez or lod aliez
Dindan ar Hallaoued, leun a fallagriez.

E-mesk ar fank, e-kreiz ar skorn e-pad ar goañv ;
E-touez ar poultr, dindan an heol e-kerz an hañv ;
An hanter a'n amzer douaret en toullou,
Evel ar re zaonet en puñs an iverniou,
O turia, 'vel gozed, o stleja, 'vel preñved,
Setu aze buhez ar Vreiziz divroet.

Ha goude an oll boan hag ar yehed kollet,
N'on-deus ket eur gwenneg, nag eun diner ebed
Da zistrei d'or Bro ger, 'leh e karfem mervel :
Red mad eo dim eta tremen, er broiou pell.

N'on-deus ket eur beleg, pa deu an eur euzuz,
Da lakaad on ene etre daouarn Jezuz ;
Red eo mervel heb êr, heb heol, e-kreiz an trouz,
War vein pe war blanken, heb eur holhedad plouz.

Gwech ebed evidom ne vez sul na gouel-berz ;
Pleget gand ar glahar, ar reuzeudig a gerz

¹⁰⁹ ar re : pere, er skrid orin.

Da heul reuzidikoh en-pad hirder ar bloa',
Evel loened-kezeg staget da charrea.
Gweled a ra e wreg gand an anken debret
Hag e vugale baour o krena, morlivet,
Heb boued hag heb dillad, er goañv, en e yender,
Pa vez ouz an doenn en-pign an dent-genver.

Or boued a vez bemdez koz restajou ken brein
Ken n'houlfe ket aneze ar moh, zoken, d'o lein ;
Hag an dour a evom, karget a loustoni,
A zegas 'hed ar bloaz terziennou fall d'an ti.

Gwasad keuz on-deus-ni d'or Mamm-Vro Breiz-Izel !
Pegement e karfem distrei di da vervel !
Mez dalhet om en kêr, dalhet gand ar vez fall,
Evel an oll dud paour a zo eet da Vro-Hall.

En Breiz 'vezem, gwechall, en peuh, en levez :
Ed 'veze 'n or parkou, or buoh a roe lêz.
Da beb gouel, dastumet en-dro d'an taoliou braz,
Goude 'veze goullet digand Doue e hras,
Dirag meuziou yahuz, dirag jistr alaouret,
Deuz kalonou an dud 'zaille ar joausted ;

Er goañv, d'abardaez-noz, 'n eur didilla¹¹⁰ kanab,
Pep hini 'zorhenne hwella ma vije kap ;
Ha pep sul euz an hañv, d'ar pardonioù pedet,
En tier or herent e vezem-ni gwelet.

Larit dim, tud or Bro, daoust hag-eñ e vez c'hoaz
Pardonioù kaer en Breiz ; festou d'an deiz-ha-bloaz ;
Festou d'an dimezi, festou da varlarje',
Festou d'ar vadeziant, 'vel gwechall e veze ?
Ha nozveziou seder, 'pad ar miziu kaled,
Dirag ar podad jistr tro-ha-tro d'an oaled ?
Gouelioù kaer d'ar Zent vad, 'kichenn o chapel goz,
Gouelioù kaer da Zoue, en iliz ar barroz ?

Erwanig, paotr youank gouizieg diwar ar mêz :

Daoust d'an droug greet dezi, Breiz-Izel 'zalh d'he brud :
Biken ne vo troket 'vel troker loened mud.
'Pad ma vezo douar an douar, er bed-mañ,
Breiz a vo Breiz, hag hi a garfom ar muiañ.

Peogwir eh argasont or yez 'mêz o skolio',
Skolioù all a zavfom, dalhet gand tud or bro,
Or yez a vo komzet evel e oa gwechall,
A-raog ma oa krouet broad ha yez Vro-Hall.
Bepred on-deus gouelioù 'n enor d'ar re varo,
Ha, da veuli ar Zent, burzuduz pardonioù¹¹¹ ;
Bepred 'heuilloom, ar zul, an oll lidou santel,
Ha bepred om kerent a-dost evel a-bell.

En miziu du ar goañv, en-pad an nozveziou,

¹¹⁰ didilla : teilla.

¹¹¹ burzuduz pardonioù : pardonioù burzuduz.

E vezom bepred laouen o kleved marvaillou,
Rag evel e tiwan yeot nevez war gozenn,
Beb bloaz 'zao adarre, en Breiz koz, konterien.

Ne varvo kennebeud ar Varzed helavar
Ar re¹¹² a oar ober levenez gand glahar.

Ra zavo Breiz-Izel he fenn diwar-vremañ !
Rag, kaer am-eus selloud, bro ebed ne welan
D'an hini Doue¹¹³, 'n-efe 'n e vadelez,
Evel d'ar vroig-mañ, roet pinvidigez.
« Ar mor 'zo en he zro, koajou don en he hreiz » ;
En he steriou ken stank, dour splann a ruill a-leiz ;
Beza he-deus prajou, lanneier, menezio',
Parkou gwisket gand lann ha tagosou dero ;
Koajou leun a evned ha liorzou leun a frouez :
« 'Vid ho meuli, Doue ! re zister eo ma mouez ! »

O Breiz-Izel ! douar ken brav, douar ken mad !
Evidout e skuillfen, gand levenez, ma gwad,
Rag ennout ma mammig 'luskellas ma havell...
Kentoh 'vid nah ahanout m'hen lar : Kentoh mervel !

¹¹² Ar re : pere, er skrid orin.

¹¹³ D'an hini Doue : Da behini, er skrid orin.

Ti kaniri¹¹⁴ Vreiz

Ni 'zo deut da gana herie
 'Vel en Amzer Goz,
Pa oa 'uz d'ar Vro dorn Doue
 O rei e vennaos ;
En amzer ma oa Breiz-Izel
Eur vro gaer hag eur vro zantel :
 Deut a-leiz
'Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Ni on-deus savet an ti-mañ
 En-kreiz an dachenn ;
N'eus moger 'bed en-dro dezañ,
 Hag evid toenn
N'eus 'med bolz sklêriuz an neñvou,
Pe ar gwez, pe ar hoabrennou :
 Deut a-leiz
'Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Ni 'fell dim e vo hadsavet
 An oll bardoniou,
Ha, 'vel gwechall, e vo kanet
 Gwerziou ha soniou :
Argasit ar skweriou hudur,
Kemerit ar wir blijadur :
 Deut a-leiz
'Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Tostait 'ta braz ha bihan
 Ha pinvig ha paour :
Ne ganom ket evid arhant
 Kenenbedu 'vid aour.
Ni a ro or poan, on amzer
'Vid Breiz-Izel hag he brazder :
 Deut a-leiz
'Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Ar Furnez hag ar Wirionez,
 Argaset dre-oll,
Siwaz ! 'barz an Amzer Nevez,
 Gand an dud diroll,
Ganim e vint skoaziet bepred,
En eneb da vestrou ar bed :
 Deut a-leiz
'Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Amañ 'ta e klevfet meuli
 Pez a dle sevel
An eneu mad en dudi,
 'Vel war diou askell ;
Ar fallagriez, diskuillet,
A vo taolet d'an Droug-Spered ;
 Deut a-leiz

¹¹⁴ kaniri : kanerien.

‘Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Evid divenn or hoz Herez¹¹⁵,

Dreist-oll Feiz ha Yez,

Ni ‘ya en Briz dre bep parrez

Heb doujañs na mez,

‘Vel ar beorien ni ‘oar bale

Ha kousked war blouz ‘vid gwele :

Deut a-leiz

‘Barz en Ti Kaniri Vreiz.

Mar pezh bet eun tamm plijadur,

P’arrufet er gêr,

D’ho re goz, ha d’ho krouadur,

Kanit ‘ta, emberr,

Eur werz vurzuduz pe eur zon

Evid ma zaillo o halon,

En o hreiz,

Dre garantez evid Breiz.

¹¹⁵ or hoz Herez : on Herez koz (lavared a ra Berthou ar hontrol euz ar pezh e-noa c’hoant da lavaroud).

Broad sklaved !

Maro ennoh evid biken,
Maro elfenn al librentez
Ha sehet ennoh ar vammenn,
Ar vammenn hwek a garantez,
C'hoant hoh-eus bremañ d'on lakaad
Heñvel ouzoh-hu, Gallaoued :
Koll e vefet 'barz an argad,
Broad sklaved !

Broad sklaved !, ya, sklaved oh,
Sklaved eh oh 'baoe daou vil bloaz :
Roman, Jerman, mui ha muioh,
O-deus behiet ponner ho skoaz.
Na agnd Kezar, na gand Kloviz,
Na kennebeud an Normaned,
N'om bet staget gand eun tortis,
Broad sklaved !

Dizehet om-ni a-viskoaz
Gand ar c'hoant da chom diere ;
N'on-deus nepred kollet ar blaz
Deuz evaj mad or hoz Huñvre¹¹⁶.
C'hwi 'h-eus evet deuz dour ar ster
Gand hoh enebour kontammet :
Ha kollet hoh-eus ar sklêrder,
Broad sklaved !

Ha bremañ 'fell dah huali
An neb 'zo chomet dishual...
An hini 'n-eus ranket senti
'Fell dezañ plega ar re all !
N'eus gwasoh mestr 'vid eur mevel,
Pa vez dezañ an dorn roet :
Mevelienn oh a-raog genel,
Broad sklaved !

Kaer zo bet skei warnom, digar,
Ni, a spered 'zo c'hoaz distag.
Selloud 'reom evel eur par
Ar galloudeg hag an divag¹¹⁷.
Na glaskit ken sklaved en Breiz...
Kenteliou mad ne laran ket,
Mar zav eun deiz ar vez 'n ho kreiz,
Broad sklaved !

¹¹⁶ or hoz Huñvre : on Huñvre koz.

¹¹⁷ divag : heb herez.

Luskellerez

« Biñv ! bañv ! klohou
‘Uz d’ar mêziou,
‘Uz d’an aochou,

Kasit d’ar bed-oll ar helou :

« O ! bugel e vammig !
Badezet bremaig,
Bez, eun deiz, Lemenig ! »

Kousk ‘n ez kavell
Me da luskell,
O ! ma bugel !

Ouz eun êlig gwenn c’hoaz heñvel.

« Mez adaleg bremañ
O Doue ! lak ennañ
Nerz Arzur ha Morvan. »

« Bugel dister,
Gand an amzer,
Nerz ha brazder

Az-pezo ‘vid beza salver,
Salver or Breiz karet,
Dim-ni diouganet,
Gwechall gand ar Varzed.

Deuz Breiz-Izel,
Bro da gavell,
Bete mervel,

An ano ‘vo war da vuzell.

Gand ar Gall milliget
Na pa ves merzeriet,
Te ‘youho : Brezi bepred !

Dit me ‘gano
Ar Re varo,
Lufr o ano :

N’eo ket lêz hepken az mago,

Bez ar brasa Breizad,
Euzuz d’an Ermêziad,
Kresk evid an Argad. »

Evid skeudenn Nominoe

Morvan Lez-Breiz, ha te maro !
Maro 'vefe ganit ar vro ?...
War da lerh-te, roue merzer,
Kavoud 'rafe c'hoaz eur zalver ?
Piou he degasfe d'ar vuhe' ?
« Nominoe. »

Morvan 'baeas an droug-kinnig
D'ar Gall gand houarn en e gig.
Morvan lazet, setu on Breiz
D'ar Hallaoued, adarre, preiz.
War o roue piou a drehfe ?...
« Nominoe. »

Droug-kinnig Breiz, paeet en-deus
Gadn sahadou mein eur vengleuz.
« Aour dit-te, merer roue Frañs ?...
Da benn en skudell ar valañs ! »
Piou an hini 'reas kement-se ?
« Nominoe. »

Pa gerz Nominoe, raktal
Eh eo trehet Charlez ar Moal ;
Trehet eh eo an Normaned
Ha Breiz-Vihan 'zo hadsavet.
Ne zent ken 'med ouz eur Roue :
Nominoe.

O Roue Meur ! Roue dispar !
Dleet eo dit beva er hloar,
Deuz on broadelez, o tad !
Dit-te on anaoudegez vad !
Sell unanet da vugale,
Nominoe.

Sonet eo eur on haddihun,
Mez pa n'out mestr, ne vo nikun !
Hogen, 'vid ma vi ganim c'hoaz,
Ni 'zavo dit eur skeudenn vraz,
Ha pignet 'vo war eur mene',
Nominoe.

Goude komz

Sevenet an diouganou :
Levenez 'leiz ar halonou,

Hag an awen-veur o c'hweza
War spered Brezi o tistriza.

War an Daolvên eo greet al le :
An eur a zono hebdale.

Arru Lemenig gwenn baro,
Lemenig an Treher garo.

Dond a raio 'vel tarz-an-deiz,
Ha war e lersh e kerzo Breiz.

Emañ war ribl ster an Elorn,
Kleze Arzur lufruz 'n e zorn.

E vleo loued, mez 'n galon
E verv gwad kadarn eul leon.

E armeou a yelo pell,
Pelloh 'vid bevenn Vreiz-Izel.

Stourmi outañ, den n'hen gallo,
Na Saoz, na Roman, na Gallo¹¹⁸.

Arru ! Dzorher or Frankiz,
Lemenig, levenez Vreiziz.

¹¹⁸ Gallo : Frank

